

Garreg (Toussaint René Marie Le Garrec) (Hollsent Reun Mari ar Garreg) (Ar
Barner) Kergrist-Moelou 1862 - Montroulez 1939.
Ollvelen a oa bet embannet e 1926.
Kurunet e oa bet gand ar Bleun-Brug
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Kinnig an Aozer d'ar Barz “Bleimor“

Kinnig a ran va zamm labour d'ar Barz divent
En-doa klevet mouez vraz ar varzed diagent,
Hag euz telenn Arvor en-doa tennet eur zon
Sort na oa bet biskoaz ken uhel na ken don.

Va “haourez“¹ a lakaan dindan mir ar Gedour
A zav sonn, ramzel, dirag an enebour,
E lagad war an noz, e zorn war e vouhal,
Da ziwall koantiri Breiz-Izel ha Bro-Hall.

Hag er memez eñvor kañvuz e saludan
Daou letanant Breizad, speredeg, leun a dan,
Kouezet o-daou feal d'o Bro, feal d'o le :
Unan aneze “Bleimor“, ha va mab egile.

Montroulez, d'an 18 a viz Mezeven 1923.

¹ Va “haourez“ : va harozez.

C'hoarieren

Ollvelen, kadourez yaouank.

Nerzveur, kadour a reñk uhel.

Minter, tad Ollvelen.

Karnag, bet roue war Douraniz.

Hildeo, hudour Touraniad.

Penndrask, c'hoar Karnag.

Garrwenn, mignonez Ollvelen.

Rutan, kadour kelt.

Skoazeg, kadour kelt.

Kreñvbost, kadour kelt.

Arzdu, kadour kelt.

Pradou, kadour kelt.

Gwadog, kadour kelt.

Penhorz, kadour kelt.

Turluan, kadour kelt.

Diou vatez.

Ar hadki² Tonk.

² Ar hadki : eur hi evid ar had (ar brezel).

Arvest kenta

E ti Nerzveur : eun doenn zoul ; eun adraoñ hepken, goloet al leurzi gand krehen a bep sort loened ; eun oaled er hreiz, eun toull-moged a-uz d'an oaled ; irhier, bankou, skiñvier en-dro d'an ti ; kerniel eva ha daou pe dri bez dillad a-istribill ouz ar peulioù a zoug an doenn.

Eun nor digor en tu kleiz ; eun nor zerret en tu dehou.

Kenta pennad

Penndrask (*o puri eur hleze-meur*) ; **Hildeo** (*oh erruoud dre an nor a-gleiz*).

Penndrask

Eur hoziad a welan o tond hag'anavezan ;
Ha, ma n'eo ket Hildeo a vez greet anezañ
Emaon faziet braz.

Hildeo

Nann, ne faziez ket ;
Ha, pa zellan ouzit a-dost ha gand aket,
Eh anavezan Penndrask, an Douraniadenn vrao,
He lagad du ken lemm ha ken dihun atao,
He liou Duardez³ yah, he dent reñkennet kaer.
Med perag ne zougez da vleo na hir na berr ?

Penndrask

Abalamour, Hildeo, n'on na gwreg na matez
Gand an tiern Nerzveur, na moalez⁴ na Keltez :
N'on amañ nemed serh, rouanez goude koan.
Bremañ, 'velkent, 'm-eus urz da lezel da ziwan
Ar bleo du lugernuz a fougeen gante,
Hag a oe touzet din war goll va librente'
Pa rankas or broad plega dindan ar yeo,
Hogen, deuz ma welan, te 'zo chomet da vleo
Ha da zillad ganit en o doare gwechall.

Hildeo

Ya, paotrez : mar on-eus amzer da gaozeal,
Me 'h a da zibun dit ar gudenn penn-da-benn.
Peleh ema Nerzveur ?

Penndrask

War-lerh e hoantadenn
E red bemdez deuz ar beure beteg an noz ;
'Barz ma teuio d'ar gêr ni 'gonto meur a gaoz.

³ Duardez : Notenn gand an oberour : ano a veze roet gand ar Gelted d'ar re a oa en o raog er vro, hag a oa rouz o bleo.

⁴ moalez : : Notenn gand an oberour : "moal" pe "moalez" : ano a veze roet gand ar Gelted d'ar re a oa bet trehet ganto. Touzet e vezent.

Hildeo

Mad sur ! e gadki Tonk ‘n-eus amzer da hedal
Ma ‘h in-me war e dro.

(Gwech ha gwech e klever, diavêz an ti deuz an tu dehou, garmadennou ki. Hildedo a gemer eur skaoñ d’azeza).

Penndrask

N’ehan ket da yudal,
Bet gloazet en e skoaz gand eun taol dant tourh-gouez.

Hildeo

Da glemm ha da youhal en-devo digarez.
Gand va skiant hudour eta ‘m-eus gounezet
Ma vije va fennad bleo gwenn ganin lezet.
Devez ar biladeg, ‘oam eur mil pe war-dro
O hortoz touza deom or bleo hag or baro,
D’on lakaad dindan mestr an anevaled,
Merket ‘vid ar vuhez sklavourien, ha moaled⁵.
’N em gavet an touzer ganin : « Kemer da amzer,
Emezon-me – te ‘gredfe divleva eur sorser ? »
War ar ger-ze, kouezet e venveg hag e vreh,
‘Sellas an aotenner ouzin gand eun tamm neh :
« Te – emezañ – ‘zo sorser ? » - « Ya, paotr, me ‘oar an tu
Da lakaad ar goabrenn euz a hlaz da zond du ;
Da barea kleñved, da zegas reuz ha spont,
D’anavezoud pezh ‘zo bet ha pezh ‘zo da zond ».
Eilgeriet e oe din ; « Ma ‘teus lavaret gwir,
E vi deut mad amañ, hag e tougi bleo hir ;
Hogen, mar deo goapaad ahanom az-teus greet,
N’eo ket da vle, da benn eo ‘n hini ‘vo berraet ».
Va lavariou, kredabl, n’int ket bet kavet fall :
War an heveleb troad gand ar zorserien all,
Gand ar vedisined hag al louzaouerien,
On bet lakaet d’ober deuz gloaz pe deuz terzienn ;
Hag, o veza n’ez eus Kelt ebed euz va stad
Gouest e skiant zoken d’am hini da dostaad,
Em-eus dreist ar re all, war hloaz pe war gleñved,
Karg al loened : saout, chas, kezeg, moh ha deñved.
‘Vel-se, ‘teuan da louzaoui da di Nerzveur
Eur hadki bet e zent war grohen va breudeur.
(Klevoud a reer adarre garmadennou eur hi).
Youh ‘ta, loen ! Me ‘zo stad ennon ouz da gleved ;
Me ‘garje ‘vijes bet gand an hoh-gouez brevet.
(Prederia a ra eur pennad, hag e kendalh) :
N’eo ket, ‘gav dit, eur hoantadenn a garantez
An hini ‘lak Nerzveur da redeg gand an deiz ?

Penndrask

Eo, broudet eo gand c’hoant eur gaer a fumelenn,

⁵ moaled : tud voal.

Merh yaouanka Minter, lesanvet Ollvelen.
He hemer a raio, mar gall, evel pried ;
Med meur a gadour all ‘zo, ‘veltañ, pistiget,
Hag hebdale, pa ‘n em gavo gouel braz an Hañv,
’Vo taolet an dibab war eun all pe warnañ.

Hildeo

Ya, barreg eo honnez da drei spered kant gwaz ;
Rag koantoh eviti n’eus bet ganet biskoaz :
Melen he bleo ‘vel aour, gwenn he bruched ‘vel erh,
Eur grohenenn⁶ warni ken flour ha pluñv elerh ;
War he diouchod liou ar roz-gouez hag ar burlu,
He muzellou heñvel ouz diou gerezenn ru’,
Daoulagad glaz karget a dan hag a sklêrder
Eur horv mentet uhel hag eur galon zeder ;
Ouspenn-ze, kreñv ha gwevn, ampart gand peb ezel,
Beh⁷ da lod kadourien war an dachenn vrezel.

Penndrask

War da glevoud, hudour bleo gwenn, o kaozeal,
E seblantez troet ganti ‘vel ar re all.

Hildeo

Koz ha yaouank, an oll wazed a dro ganti,
Ken trehuz ha ken flamm ma’z eo he c’hoantiri ;
Hag en amzer da zond, keit ha ma hallan lenn,
E welan lahadeg ha reuz diwar he fenn.
Ne gav ket dit, ‘velkent, pa vo greet an disvarn⁸,
Eo a-du gand Nerzveur, kreñv, pinvig ha kadarn,
E komzo ar galon hag ar yalh war eun dro,
Hag e taolo e zorn gallouduz ha faro
War ar baotrez dispar, skeduz en he bleo aour,
E-giz ma teu gantañ, er pred-meur,“tamm ar haour⁹“ ?

Penndrask

Eo, deuz pezh a zoñjan ha deuz pezh a lavar,
Me ‘gred, eñ a vo treh, devez ar Gouel, ma kar ;
Hogen, dalhet eo c’hoaz, ‘tre daou benn e vennoz.
E glevoud am-eus greet, ‘kreiz e gousk, ‘vid an noz
O hopal a-bouez-penn : « Nann, ne zimezin ket ! »
Ha kerkent dre va zamm spered ‘zo difrinket
Eur zoñj en-deus lakaet va foaniou da skañvaad :
E hallfe marteze chom ganin-me dalhmad !

Hildeo

Sell ‘ta ! Karoud a rez anezañ ?

⁶ Eur grohenenn : he hrohen.

⁷ Beh da : dreist da

⁸ an disvarn : ar choaz.

⁹ tamm ar haour : Notenn gand an oberour : ar gwella tamm a vefe roet d’an hini kaloneka er predou keltieg.

Penndrask

Ya, siwaz !

Kement ha ma hell eur vaouez karoud eur gwaz.
Em heñver koulskoude n'eo na reiz na tener :
E gomz 'zo rust, e zell digar, e zorn pounner ;
Hag evid va gervel 'n-eus nemed eur ger brao :
"Penn du" ahann, "Penn du" 'lez-hont, "Penn du" atao !
Med Nerzveur a zo kreñv, ha dindan e halloud,
'Vel ma 'n em blij e skeud ar gwez braz ar gwezvoud,
Ar zerh a gousk eüruz hag a vev dibreder.

Hildeo

Neuze 'ta, te 'vefe dizammet ha seder
Ma hellfe trei eured Nerzveur war an tu gin ?

Penndrask

Ya, gweled a rafen gand eul lagad lirzin
E youlou dimezi tanfoeltret oll en dour.

Hildeo

Mad, paotrez, n'az-teus ken 'med lared d'az kadour,
Pa zistroio d'ar gêr, nehet 'leiz e grohen
Diwar-benn an doare da gutuill e rozenn,
Eh anavezez eun hudour koz, anvet Hildeo,
Hag a oar difazi kas da vad ar sort treo'¹⁰

Penndrask

Laret e vo dezañ.

Hildeo

Kaoze fur, hag e vo
Hentchet a-du ganit an eurvad. Kenavo !
Bremañ, 'h an, evelkent, da weled ar hadki ;
Ma teu pare ganin, 'vo ket heb diegi.

(Ha kuit dre an nor a-zehou)

¹⁰ treo' : traou.

Eil pennad

Penndrask heh-unan

(Adkroget da buri ar hleze meur)

Pell, pell, e chom Nerzveur da redeg ‘mêz e di !
Mar ouezfe koulskoude pegement a zudi
‘Vez degaset gand e zistro d’e “Zuardenn“,
Ma pouezfe pegement e karan va chadenn,
E rafe marteze eun tammig pled ouzon,
Hag an heol a barfe lintruz war va frizon...
Allaz ! ne bar an heol ‘med evid Ollvelen ;
‘Viti ‘kan ar varzed, ‘viti ‘son an delenn,
Ha gand Penndrask e chom ar vez hag an dispriz.
Disheñvel ‘oa va stad pa rene Touraniz,
Pa oa va breur Karnag roue war ar vro-mañ.
N’eus forz, gwell eo ganin chom atao, ‘vel bremañ,
D’ober kiez vihan gand treher braz va bro ;
Eur blijadur eo din, eur blijadur hwero,
Puri feteiz, puri feno, puri warhoaz
“Glazluh“, ar hleze meur n’eo bet trehet biskoaz,
Ar hleze ‘n-eus gwintet¹¹ rouantelez va breur,
Hag a garan ‘velkent, pa’z eo kleze Nerzveur !
(Ehanet da buri, e sav ar hleze a-blom d’an neh) :
Klevoud a ran Nerzveur o tistrei.

¹¹ gwintet : kaset da get.

Trede pennad

Penndrask, Nerzveur

Nerzveur

(O tond en ti, teñval e benn).

Pegen brao

Eo beza 'veldout-te, Penndrask, diglemm atao,
N'eus forz petore liou a deu war an amzer,
N'eus forz ouzit ivez pegen rog e komzer !
Daoust ha petra 'ro dit nerz da veza ken reiz ?

Penndrask

Eur garantez nevez gwriennet don em hreiz.

Nerzveur

Sell, skourr aze Glazluh ouz e dach alaouret,
Ha kaozeom eun tamm diwar-benn va eured.
Me 'm-eus ivez,'veldout, nevez deut em halon
Eur garantez na ra 'med krignad ahanon.
Perag din-me 'ra poan pezh a ra vad dit-te ?

Penndrask

Dre 'n abeg n'on-eus ket heveleb karante' :
Va hini-me 'n em ro hep klask restaol ebed ;
'Leh te 'fell dit beza dreist an oll dibabet
Ha, goude 'tevo bet dit da-eun Ollvelen,
Marteze n'he dalhi 'med eur bloavez hepken.

Nerzveur

Te 'wel deun va mennoz 'vel eun divinourez.
Dreist pep tra, dreist pep den 'karan va hadourez ;
Med aon am-eus, 'raog ma vin bet eur bloaz ganti¹²,
E teufe ar skuizder da zon an disparti.
Mar deo flamm he hened ha drant he yaouankiz,
Eun dalvoudegez kaer ivez 'he-deus ar frankiz,
Hag an armou sklinton, hag ar hirri-brezel,
Hag ar stourmou ruz-gwad ; ha, pa daolan eur zell
War va hleze Glazluh ken brao puret ganit,
D'Ollvelen na dezañ n'hallan rei va gounid.
Nehet on, nehet dall ; n'ouzon petra d'ober.

Penndrask

Me, Nerzveur, ma kerez, 'laro dit berr-ha-berr :
Eun hudour 'anavezan, deut eun tamm war an oad,
Hag a oa brudet braz gwechall en or broad
Da gelenn mad an dud ; dreist-oll em-eus klevet,
N'eo bet c'hwitet biskoaz war engaliou¹³ eured.

¹² eur bloaz ganti : eru bloavez ganti.

Nerzveur

Amañ eo deut ar Gelted ?

Penndrask

Ya ; hennez eo
Ar sorser Touraniad a lesanver Hildeo,
Hag a gonter eur mestr da louzaoui loened.

Nerzveur

Da hennez, just a-walh, e zo laret doned
War-dro va hadki Tonk.

Penndrask

Deut eo, hag ema c'hoaz ;
Rag bepred e klever harzadeg yud ar chas.

Nerzveur

Lar dezañ 'ta, pa vo dizoh gand ar hadki,
Doned war-eeun d'am haoud.

Penndrask

Greet 'vo da gefridi.

Nerzveur

(O selled dre an nor gleiz).
Tan-kurun ! Minter koz oh erruoud bremañ !
Hildeo a hortozo ma vo fin gand hemañ.

Penndrask

Ya, Nerzveur, bez dineh : ar sorser a hedo
Ma vo Minter eet kuit, ha 'n em gavo e dro.
(Penndrask ah a 'mêz dre an nor a-zehou. Minter a deu dre an nor a-gleiz).

¹³ engaliou : emgleoiou.

Pevare pennad

Nerzveur, Minter

Nerzveur

Plijadur hag enor a ra din-me gweled
Minter, mab Ollah-Ruz, 'toull va dor degouezet.

Minter

Mar don e ti Nerzveur 'n em gavet evel-henn,
Eo dre m'on degaset gand va merh Ollvelen.

Nerzveur

Neb a zo deut d'am haoud 'vid eur plahig ken koant
En-devo diganin da eva deuz e hoant.
Aze du-hont dirag an tan, 'vel ma tere.

(En eur zigeri an nor a-zehou).

Penndrask, degas eun daol, kerniel ha chufere.

(Penndrask hag eur plah all a zegas daou bennad plankenn gand daou varh-koad d'ober eun daol, hag eur pezh picherad chufere ; diskregi a reont daou gorn gourejen diouz o zachou, hag o lakaad dirag ar wazed. Penndrask a ziskenn da eva, hag eh eont kuit o-diou).

Sachom war ar re-mañ, hag evom da yehed
Ollvelen, ar goantenn ema ganti trehet
Kement plah keneduz a ziwan en Donva !

Minter

Me 'venn, a-unan tro gand Ollvelen, eva
Da yehed ar haour-braz Nerzveur, an hini 'ro
War bep tachenn emgann an treh da dud e vro !
(Eva a reont o-daou).

Nerzveur

Gwelom eta bremañ petore nevezenti
A zo gand Ollvelen.

Minter

Da brieta ganti

E karfe kaoud 'hanout, mar ve greet an engal ;
Hag, o veza zo c'hoaz pemzeg pe hwezeg all
C'hoanteg-braz da gemer anezi 'benn Gouel an Hañv,
Eo gwell ganit 'vefe dioustu greet ar prenañ¹⁴
Mar touez, 'vel m'az-teus roet dezi da houzoud,
Karoud anezi kement ha ma kar ahanout ;
Ha neuze gand ar Gouel 'vo klozet or marhad
'N eur vond ar verh ganit, hag an traou gand an tad.

Nerzveur

Laret 'm-eus, ha ne vo biken dislaret,

¹⁴ prenañ : ar brenadenn.

Da verh koant Ollvelen eo va muia-karet.
Ra gouezo war va fenn oll gurunou Taran
Ma n'eo ket hi dreist an oll verhed a garan !
Hogen, n'ouzon ket c'hoaz pe 'vid eur bloaz hepken
He hemerin, pe 'vid ar vuhez penn-da-benn ;
Ha gand se, gra daou briz, unan 'vid peb doare,
'Benn ar Gouel e welin war beseurt troad bale.

Minter

Me ne ran forz ebed ; rag n'am-bo ket a goll
Nag e teufe 'r baotrez goude bloaz 'mêz a roll :
Gwazed a vo bepred o redeg war he lerh,
Ha traou 'vo roet din adarre 'vid va merh.
Set' amañ diganit ar priz a houlenan
Da veza rentet din em forz, deiz Gouel an Hañv,
'Raog kuz-heol, mar vez greet an eured da viken,
Hag hanter kemend-all mar vez bloazieg hepken :
Diou gazeg leun, pevar marh gwenn, pevar marh ru',
Peder ebeulez wenn, ha pevar ebeul du ;
Peder dousenn deñved, deg pemoh a hweh miz,
Deg buoh, deg ounner, ha daouzeg taro briz.
Kement-se 'dalvez din diouered Ollvelen.

Nerzveur

Nag e vefe diou wech pounnerroh ar goulenn,
'Vefe ket da dostaad ouz an dalvoudegez
A zo 'n eur wreg ken koant prenet d'am ziegez.
Ar gont-se 'vo rentet, devez ar Gouel, er gêr,
Hag an hanter anezi mar greom eured verr.
Va lavar a vo greet, m'hen tou dit war va le :
Ma ne vez ket, ra vin dalhet ouz ar bale¹⁵,
Ra chomo, 'kreiz ma vin o stourm war an dachenn,
Va dorn dehou war Glazluh difiñv da virviken !
Ha bremañ, p'eo skoulmet etrezom an ere,
Stardom anezañ gand eur bannah chufere.
(*Diskenn a ra d'eva, hag e savont o herniel*).

Minter

D'eur prener ken gwirion, petra 'vo eilgeriet
'Med reketi dezañ ha d'e zanvez-pried
An eurvad en o zi, an treh e pep krogad,
Merhed koant 'vel o mamm, mibien kreñv 'vel o zad ?

Nerzveur

Me 'reket dit ivez, Minter, eur chatal gren,
Eur spered didamall, eur galon yah da ren
'Touez ar Gelted seder eur gozni digatar !
(*Eva a reont*).

¹⁵ ra vin dalhet ouz ar bale : ra ne vin ket ken evid bale.

Minter

Da gaoud va merh eh an bremañ war da lavar¹⁶.
(*Ha kuit dre an nor a-gleiz*).

¹⁶ war da lavar : gand ar pezh az-teus lavaret.

Pempved pennad

Nerzveur, Hildeo (*o tond dre an nor a-zehou*).

Nerzveur

Deus d'azeza, hudour. Pareet eo va hi ?

Hildeo

Diboaniet n'eo ken c'hoaz¹⁷ ; med gantañ hemolhi,
Mar c'hoantaez ober, 'benn diou pe deir nozvez.

Nerzveur

Va hoant hemolhi 'zo 'vid eur pennad eet e-mêz,
O klask tizoud emañ eul loen reiz, eul loen brao ;
Hogen, pa vo paket, n'ouzon pe 'vid atao
Pe 'vid eur reuziad berr e vo fur e viroud.

Hildeo

Me 'wel petore loen 'maout en soñj da dizoud,
Nerzveur : eur wreg yaouank az-teus c'hoant da gemer,
Nemed n'ouzout ket c'hoaz evid pegeid amzer.

Nerzveur

Ar wirionez, Hildeo ; te 'zo tano da fri,
Rag-se, ne garfen ket chom ganit da hoari,
Hag e tisplegin dit penn-da-benn va doare.
Bebet 'm-eus betek-henn dinask ha dizere,
Karantez 'bed em hreiz 'med hini va hleze.
Ouz va halon haro netra ken ne hoarze
'Med gwad ha lahadeg, trouz skiltruz an argad,
Klemmou tud o vervel, spouron an daoulagad
O neuial digor-frank er pennou dihouget !
Hag a-daol, 'vel koumoul gand eur bann-heol freget,
Setu skubet an oll weladennoù brezel
Gand eun dremm dudiuz, eur c'hoarzin hag eur zell
Fresk ha glan 'vel an erh mintin war ar menez,
Ar hadour 'oa ennon 'zo deut eun den nevez,
C'hoant dezañ da zelaou ouz mouezioù kuñv iskiz
A gan 'n e ziabarz kaerder ha yaouankiz,
Ha d'ankounac'haad eur reuziad an distruj didruez
'Vid intent gand ar vadelez hag ar vuhez.
A-greiz-kalon emañ d'Ollvelen 'n em roet ;
Med pegeid e chomin war an tu-ze troet ?
Aon am-eus, pa vin bet tremen eur bloaz ganti,
E tehfe re vuan an eurvad 'mêz an ti.

Hildeo

Nag a dud ken nehet 'veldout a gelennis

¹⁷ Diboaniet n'eo ken c'hoaz : diboaniet nemetken.

D'ar houlz ne oan hudour nemed gand Touraniz !
Nag a dud a zo bet ouz va zrugarekaad
Dre ma oant bet ganin bleniet war an hent mad !
Hogen, te 'zisprizo 'vel kaoziou bugale
Ar gredenn a lakae Touraniz da vale,
Ha dirazout ne dalvez ket dispak ar gaoz
Euz galloud burzuduz "Feunteun an Dervenn goz".

Nerzveur

Eo, eo, dispak atao : netra ne vo kavet
Ganin-me na fentuz, na diêz, na kaled,
Netra n'hellez lared a gement na gredin,
Hildeo, gand ma vo mad da sklêrijenna din
An hent emañ o klask an eürusted ennañ.

Hildeo

Du-hont, 'leh ma'h echu kornieg¹⁸ ar blênenn-mañ,
E leh ma teu glazur ar Hoad-Meur da vervel,
E zo, troet he dour ouz an heol o sevel,
Ha kelhiet a-hend-all gand peziou mein garo,
Eur feunteun vilvloazieg dindan gwez koz dero.
Touraniz o-deus bet ar gredenn a-viskoaz
E tle paotr ha paotrez, pa zoubont o fenn noaz
Er feunteun-ze, gweled an eil dremm egile,
Mar dint lakaet da 'n em garoud 'doug ar vuhe'.

Nerzveur

Neuze 'ta, n'eo ket te gand da skiant hudour
A wele 'n traou da zond merket e deun an dour ?

Hildeo

Nann, me ne reen netra 'med displega d'an dud
Penaoz en em gemer 'vid degas ar burzud.
Kalz, o veza c'hwitet war o zaol da genta,
'Deue da glask 'hanon goude-ze d'o heñcha ;
Ha kement o-deus bet sentet ouz va hentel
'Zo bet sklêrijennet gand ar feunteun zantel.

Nerzveur

Fiziañs am-eus ennout, hudour ; lavar din 'ta
Peur ha penaoz 'vo mad d'ar feunteun 'n em renta.

Hildeo

(Goude eur pennadig prederia).

Warhoaz ar Hann¹⁹ ; an deiz war-lerh e vo ar poent
Dit-te da 'n em lakaad war-dro Sav-heol²⁰ en hent,
Ollvelen ouz da heul, war-hed pemzeg talmad.

¹⁸ kornieg : e stumm eur horn, eur beg lemm.

¹⁹ ar Hann : Kann al loar.

²⁰ war-dro Sav-heol : pa zavo an heol.

Erru ‘tal ar feunteun, ‘ranki, ‘vid beza mad,
Chom da hortoz, a-raog souba da benn enni,
Ken na vo deut an heol en dour da lugerni.

Nerzveur

Red ‘vo da bep hini ‘hanom beza e-eun ?

Hildeo

Ar gwaz hepken ranko dond e-eun d’ar feunteun,
Diskabell hag heb arm ebed ‘med e gleze ;
Ar baotrez, bete goud ‘ve aonig marteze,
‘Hello degas ganti konsort pe gonsortez.
M’hen tou dit, ouz an oll boenchou-ze ma sentez,
Ar feunteun ‘verko dit sklêr en he mezelour
Pegeid eureujet e hall chom eur brezelour.

Nerzveur

Ya, goude diou nozvez an aprou-ze ‘vo greet ;
Ha, mar teu ‘n dro da vad, te ne vi ket ankounac’haet.

Hildeo

Me ‘gred e teuio mad-kenañ ; ha da hedall
Eh an da weled c’hoaz tri pe bevar chatal.
(*Ha kuit dre an nor a-zehou*).

C'hwehved pennad

Nerzveur, Ollvelen (*deut dre an nor a-gleiz*).

Nerzveur

Nag a joa 'ra ganin gweled war va zreuzou
An hini 'vo karet dreist an oll briedou !

Ollvelen

Ouz da weled, Nerzveur, eamon laouen ivez :
Rag va frena 'teus greet heb espern an danvez.
Hogen, da garantez ne bado ket a bell²¹
Ma vez 'benn eur bloavez nijet gand an avel.

Nerzveur

N'em-eus ket laret c'hoaz tremen gand eur bloavez,
Ha ma ne zelaoufen 'med ouz va hoantegez,
Dioustu 'vid ar vuhez 'tivizfen prieda.
Med, gand aon e teufen tro-pe-dro da yena
Pe dre zilez, pe dre skuizder, pe dre gozni,
Gand aon e rankfe dond neuze dre vrumenni
Da zaoulagad ken glaz, ken eüruz, ken seder,
Em-eus soñjet fizioud war skiant eur sorser
Da houd ha ni 'dle chom an eil gand egile
Bete diwez an hent karanteg da vale.

Ollvelen

Ar soñj 'oa mad ; med den ne oar penaoz 'vo kont
Gand on eürusted-ni 'barz an amzer da zond.

Nerzveur

Koulskoude 'm-eus kavet eur sorser Touraniad
Hag en-deus va lakaet, me 'gred, er roudenn vad.

Ollvelen

Eun Touraniad ! N'eo ket Hildeo 'reer anezañ ?

Nerzveur

Eo 'vad.

Ollvelen

Neuze 'm-eus kred : hennez a dle beza
Eun den skianteg-braz, hag or medisined
A zo pell war e lerh da louzaoui loened.
War betore roudenn out bet hentchet gantañ ?

Nerzveur

Set' amañ : displeget en-deus din da gentañ

²¹ a bell : e-pad pell.

Doare eur feunteun goz a strink heh eienenn
Er horn pella du-hont, 'leh ma tiz ar blênenn
Dero braz ar Hoad-Meur.

Ollvelen

Goud ouzon pehini :

Bet on, en eur vale, 'n em gavet stok enni.
Eur feunteun goant, ma'z eus unan war an douar.

Nerzveur

Mad, dour ar feunteun-ze 'n-eus eur galloud dispar ;
Gouez d'ar bobl Touraniad : an danvez-priedou
A dle beza eüruz a-hed o bloaveziou,
A wel sklêr, pa zoubont o fennou 'barz an dour,
An eil dremm egile, 'vel en eur mezelour.

Ollvelen

Nag e ve ken, Nerzveur, 'med 'vid ar blijadur
Da vond ganit da lenn ennañ on tonkadur,
Eh afom, pa giri, da weled ar feunteun.

Nerzveur

War 'lavar an hudour, me 'rank moned va-eun
Da genta ; te 'deuio war hed pemzeg talmad
War va lerh, hag eun all ganit, ma kavez mad.

Ollvelen

Va-eun pe gand eun all, me 'valeo dispont,
Med e vo mall ganin d'anavezoud ar respont.
Rag-se, pa vo ganit echu, te 'hortozo,
'Vid rei din da houzoud penaoz 'vo bet an dro.

Nerzveur

Hag e rin. Bremañ 'ta, 'benn an eil beurevez,
En em zalhim on-daou, tro sav-heol, war evez,
Prest da luska ; me 'gred ne raim ket tro houllou
Hag an eurvad, deuz on oll boan, on digollo.

Ollvelen

Eun devez hir, gwall hir, a gavin-me warhoaz ;
Hogen, ar gredenn 'm-eus, pa vo Nerzveur va gwaz,
Ne vo ket 'vid eun noz, eul loariad nag eur bloa',
Med 'vid atao, beteg eürusted ar Wennva.²²

²² ar Wennva : Notenn an oberour : Gwennva : ano bet roet gand ar Gelted da varadoz an harozed.

Eil arvest

War lez eur hoad koz dervennou maneg, eun dachenn distro, 'leh ma weler eur feunteun zakr kelhiet gand peziou mein, digor war-zu ar Sav-heol hepken, ha goloet euz tu ar huz-heol gand eun dervenn ramzel.

Kenta pennad

Karnag, Gwadog

(Azezet int o-daou, da houlou-deiz, war ar vein vraz dindan an dervenn).

Gwadog

Hag adarre, Karnag, preder ha koz da benn²³ ?

Gwadog

Ya, Gwadog, hag e vo, tra ma vin evel-henn
Rediet da guzad diouz lagad ar Gelted,
Rediet da blada mezeg en izelded
'Vel eur skeud dindan treid, 'vel man ouz garr ar gwez,
Ha da ren heb enor na brud, 'vel eul loen gouez,
Eur vuhez kontammet gand keuz amzer gwechall.
N'eo ket hounnez ar stad 'oa bet ouz va gedal ;
Nann, n'eo ket evel-se en-doa soñjet va zad
E kouezje an dispriz war ar bobl Touraniad
Bete gweled eun deiz mab he rouanez koz
Chomet hepken gantañ rouantelez an noz !

Gwadog

Rouantelez ebed ne dreh war da hini.
En-dro dit e tispak eur maout a zomani²⁴ :
Ar "Hoad-Meur", 'leh ma sav an dervennou santel
Oh astenn ken teñval, ken pounner o mantell,
Ken ne gredfe nikun, nemedom-ni, taol troad
En noz du peurbaduz a vir koun or broad.
Aze 'veze gwechall greet an aberz denel,
Ar gwad tomm a rede dindan ar falz-kontell²⁵ ;
Aze, dindan an taoliou mein²⁶, e kousk on zud ;
Ha morse ne glever, sebezusa burzud,
Nag arz, na karo-meur, na bleiz na gourejen,
Loen ebed o sevel e vouez en o hichenn ;
Lapous ebed ne gan, hag ar bultur penn-gwenn,
Pa dremen e-biou deze, a zalh e skrijadenn,
Evel pa ouezfent oll pesort brazder dispar
O-deus bet an dud-se gwechall war an douar.

²³ preder ha koz da benn : prederiet ,... gand eun êr teñval.

²⁴ eur maout a zomani : eun domani vraz-kenañ.

²⁵ ar falz-kontell : ar gontell implijet evel eur gontell.

²⁶ an taoliou mein : taoliou greet e mein.

Karnag

Teñvalijenn an noz, ha sioulder ar maro,
Set' aze, 'vad, din-me, gweladennou faro²⁷,
E-pad m'ema ar Helt, dindan an heol lirzin,
O karoud hag o stourm, o son hag o c'hoarzin !

Gwadog

'Vid ar Helt da veza 'n em gavet ar hreñva
War ar blênenn gantañ lesanvet an "Donva",
Biken n'hallfe, 'veldout, war an dour braz garo
Kas gand eun tammig roeñv eul lestr bihan en-dro,
Douget 'vel eun delienn gand nerz ar steriou don,
Ha chom atao dizoan²⁸ ha digren da galon.
N'eo ket ar Helt ivez 'vefe, 'veldout, barreg
D'ober e vestr er hoajeier gand eur wareg,
Bete n'heller lared eo barnet da vervel
Kement loen gouez 'dosta dit-te war-hed eur zell.
Ha peleh 'vo kavet eur haner bleo melen
Gouest da gana 'veldout 'n eur zon war an delenn ?

Karnag

Petra 'dalv din skei eeun, son brao, kaoud kalon greñv
Bremañ, p'emaon lakaet disterroh 'vid eur preñv,
Ha gand ar Blanedenn diskaret ken izel ?
Perag n'on ket marvet war an dachenn vrezel
An deiz 'rankis plega ? – Ne vijen ket chomet,
Ar gounnar em herhenn, 'vel eun hoh-gouez doñveet,
Gand ar zoñj o krignad noz ha deiz va halon
Euz ar beh dismegañs 'zo bet sammet warnon.
Gwasad taolenn 'oa bet deom gweled mez or bro
Hag ar vaz-yeo staget ouz kerniel an Taro,
Skubet or hadourien war al lanneg, heñvel
Ouz deliou stlabezet er hoad gand an avel !
Gweled a ran bepred Nerzveur, ar stourmer braz,
E vleo melen o rodellad war e ziouskoaz,
Taer e zremm, noaz e gorr, tan en e zaoulagad,
E garr-emgann o kas ar spont dre or strollad,
Ha son an trompillou ken skiltruz o voudal
Ma saille or hezeg a-dreuz 'vel loened dall.
Bep taol digand Nerzveur a winte eur marheg,
Hag eur jao 'dehe kuit a-raog al lahadeg.
'N em gavet war hed pemp pe hweh gourhed outañ,
Ha stignet va gwareg ganin deuz ar startañ,
Gand ar vreh-mañ, kustum atao da dizoud preiz,
E laoskin eun tenn bir war-eeun da gaoud e greiz.
N'ouzon pe divinour pe hudour 'oa va den :
Gand e gleze houarn, 'kreiz eur pezh c'hoarzedenn,
E tihellas va bir da glask eur roudenn all.

²⁷ gweladennou faro : traou plijuz da weled.

²⁸ dizoan : di-doan, amañ, heb aon.

E roñsed gand va marh ‘lammas ‘n eur hwirinal,
 Ha me, ‘vel eur frouezenn kutuillet diouz ar barr,
 A oe gand dorn Nerzveur sachet war lein e garr.
 Kaer am-boe gand va dent, va zreid ha va bouhal,
 Kregi, skei, mallozi, difreta, firbichal,
 Ken buan hag ar gomz²⁹ paket treid ha daouarn,
 ‘Oen astennet difiñv etre maillou houarn,
 Taolet war blad ar harr – Heb ober van ouzin,
 Nerzveur a gendalhas da laha, da hoarzin,
 Da hoapaad Touraniz, da gonta dre foug
 An taoliou kaer ‘oa deut gantañ ‘baoe ma touge
 Glazluh, kenta kleze houarn ‘oe govellet.
 P’ehanas, ne stourme ken Touraniad ebed,
 Ha gand eur rangalon e welis tro-war-dro
 E oant oll pe baket, pe hloazet pe varo.

Gwadog

D’ar Red on-oa pleget : perag stourm en aner
 Pa gave deom e oa lahet on fenn-rener ?

Karnag

Gwasoh eged laha ‘reas an den-ze din ;
 Biken n’ aio diwar va zoñj, tra ma vevin,
 An doare divalo ‘n em gemeras ouzon
 Eur wech echu da skei, da youhal ha da zon :
 « Te, paotr bihan, ‘mezañ, ‘vid doare ‘zo stummet
 Gand ar bragereziou en-dro dit dastumet
 Deuz eun tammig roue war an tammou tud-mañ ;
 Anez, e vije bet faout da glopenn bremañ.
 Mennet em-eus miroud, evel eul loenig beo
 Sebezuz da ziskouez, ken bihanig ma’z eo,
 Ar zeblant den a zo ‘hanout ; da dammig penn
 A vo lezet ganit, med ar bleo diskempenn
 A zav warnañ du ‘vel an noz, reud evel sêziou,
 A ranko mond d’an traoñ ; ha da vragereziou,
 Bete goud ma sachfent warnout pe wall pe hloaz,
 Me a zalho ‘ne dit ken vi ‘n em gavet gwaz. »
 Diframmet diwar va diouvreh ha va herhenn
 Ar braoigou dispar a oe bet d’e³⁰ perhenn
 A-viskoaz a-raog din peb roue koz or bro,
 Nerzveur a adkrogas en e hoarzin garo,
 Hag e lakaas gand eun aotenner o tremen
 Touza va fennad bleo beteg ar grohenenn³¹.
 Neuze ‘tichadennas ‘hanon, hag o vezañ
 Greet eur hoar zadenn all : « Kee da vale, ‘mezañ,
 Gand da benn touzet briz e-touez ar voaled all ! »
 C’hoant am-oa da gregi, c’hoant am-oa da yudal,

²⁹ Ken buan hag ar gomz : ken buan ha ma vez lavaret...

³⁰ d’e : deze.

³¹ ar grohenenn : ar hrohenenn.

Ken kounnaret ma oan ; med gand starda va dent
E hallis mond didrouz ha mezeg gand an hent
Etre daou Gelt ramzel, roet d'e kevridi
Da gas 'hanon bete kloz ar brizonidi.

Gwadog

Ne vanjom ket, na te na me, gwall bell er hloz :
Daou all ganeom, pa oa tostig da greiz an noz,
Gand o hovad dour-mel kousket or gedourien,
E savjom prim diwar or gwele douar yen,
Hag a-lamm dreist ar hleuz, hag a-red d'ar Hoad-Meur.
Braoig 'oa bet greet c'hoaz ha deom ha d'or breudeur
O veza m'oa ganeom lezet on zamm buhez :
Rag ar Helt a gustum dibenna didruez
An enebour a gouez 'n eur stourm, dindan e bao.

Karnag

Neuze, Gwadog, te 'lak an dra-ze ober brao :
Goapaad, laerez an dud, ha taol war eur roue
Eur vez ha ne zavo ken diwar e horre ?
Ar seurt traou 'gavan-me gwasoh eged mervel ;
Hag anez ma klevan euz va hreiz o sevel
Eur vouez o lared din esperoud ha gedal,
Me 'vije 'n em lahet 'leh gouzañv kemend-all.
O ! ma teufe a-du ganin an Tonkadur,
Ma tegouezfe va zro, gand pebez plijadur
E welfen an den-ze dindan va hrabanou !
Ma vijen eun herrad hepken e vestr, m'hen tou,
E houzañvfe 'n e veo euz va ferz mil maro
E paeffe din mil gwech e hoariou garo !...
(Eun tammig trouz a glever 'dreg ar gwez).
Unan bennag aze ?
(Hildeo a zispak, eur pezh chadenn houarn gantañ, hag a stlap anezi war an douar).

Eil pennad

Karnag, Gwadog, Hildeo

Hildeo

Da vignon koz Hildeo
N'eo ket diverket c'hoaz diwar roll ar re veo.

Karnag

Souezet on kenañ o weled war da benn
Ken strujet ha biskoaz da glipennad bleo gwenn ;
Ha muioh nehet c'hoaz o weled 'n ez taouarn
Da vragal er Hoad-Meur eur pezh chadenn houarn.

Hildeo

Diwezatoh, Karnag, 'klevi ganin penaoz
Em-eus gallet derhel va bleo bete fenez.
Ar chadenn-mañ, avad, am-eus lakaet ober,
Eo poent intent ganti : rag on amzer 'zo berr.
Taolit ho-taou eur zell war an tamm labour-ze.
(*Diboueza a reont o-daou ar chadenn*).
Ne gav ket deoh, paotred, 'zo nerz a-walh aze
Evid derhel difiñv eur gourejen, eun arz.
Ar gallouduz loen 'vefe paket e-barz ?

Karnag

Ar sort maillou n'hallfe loen ebed o zerri.

Gwadog

On arem hag or houeor³² n'int 'med poderez-pri
E-tal an houarn-ze.

Hildeo

Beza zo tud akuit
Ha kreñv a-walh, d'or zoñj, evid 'n em denna kuit
Deuz 'tre kelhiou kaled ha stard 'vel ar re-mañ ?

Gwadog

N'eus ket.

Karnag

N'hall ket bezañ.

Hildeo

Mar don-me deut amañ,
Karnag, gand ar beh-se, n'eo ket 'vid fougeal,
Med evid diskouez dit emañ bepred feal
Da lezenn or broad, da wad or rouane'.

³² or houeor : or houevr.

Daoust d'am fenn da blega, va spered a vane
Dizoñvuz³³ o klask noz ha deiz petore tro
'M-ije gallet c'hoari da waskerien va bro,
Dreist-oll d'o brezelour lorhusa, d'an hini
'N-deus greet ar gwsa fae warnout ha warnom-ni.

Karnag

Piou a lerez ?

Hildeo

Nerzveur ; devez an argadenn
N'eo ket hennez 'n-oa da staget gand eur chadenn ?

Karnag

Eo, ha soñj a zalh c'hoaz va zreid ha va daouarn
Deuz an don ma oa bet enne merk an houarn.

Hildeo

Ha ma welfes Nerzveur chadennet gand houmañ,
Daoust hag ober a rafes eur sachad d'he skoulmañ
En-dro d'e izili ?

Karnag

O ! kaerad levezenez !
Ma helljen, ha ne ve ken nemed eun devez,
Derhel hennez dindan va fao da vildrailla³⁴ !

Hildeo

Mad ! an hoh-gouez 'chomo ganeom da vinella
Me ve nerzuz or breh ha kadarn or halon :
Dirag ar feunteun-mañ 'n em gavo breazon,
A-benn ma paro plom an heol a-uz d'an dour,
Nerzveur, ar hreñva den hag ar gwella kadour
A zo 'tuez ar Gelted.

Karnag

Ha gwir, amañ 'teuio ?

Hildeo

Kred ahanon, pa laran dit : dond a raio.
Rag o houzoud³⁵, Karnag, pegen c'hoanteg e oas
Da weled anezañ deuz a-dost eur wech c'hoaz ;
O veza m'eo flemmet gand broud ar garantez,
Me 'm-eus dezañ merket hag ar houlz hag an deiz
Dond da hlebia e benn er feunteun, 'vid gweled
O c'hoarzin en he dour dremm e zanvez pried,
Evel m'eo bet a-goz ar gredenn gand on zud.

³³ Dizoñvuz : ha n'eo ket deut da veza doñv.

³⁴ da vildrailla : mil-drailla : drailla e mil tamm.

³⁵ o houzoud : fazi, bet greet a-viskoaz ; levezon ar galleg.

Ha Nerzveur, heb disfi, ‘deu da glask e vurzud.

Karnag

Set’ aze, ‘vad, eur vrao a vicher d’eur hadour !
Ha dremmm piou en-deus c’hoant da zizolo en dour ?

Hildeo

Hini ken brao paotrez hag a wel sklêrijenn,
Eur gadourez yaouank lesanvet Ollvelen.
E-touez an oll re goant honnez eo ar goanta ;
Den n’hall gouzoud ped gwaz he har hag he c’hoanta.
Ha me ‘wel en amzer da zond meur a hini
Lakaet dezañ mervel dre wall he c’hoantiri.

Karnag

Unan, da vihanha, a gousto ker d’e ler
Dond amañ tre da glask eur penn koant en dour sklêr.
Kaoud a ra dit ‘vefom barreg warnañ on-tri ?

Hildeo

Nann, n’om ket tud a-walh ‘vod ober or mistri
War eur hadour ken kreñv all.

Karnag

Kee buan-ha-buan,
Gwadog, da gerhad deom Penhorz ha Turluan.
(*Gwadog kuit*).
‘Vel-se, pa vo ganin ar pevar diweza
A zalh c’hoaz an ano Touraniad en e za’,
Me ‘oar³⁶ ‘teufom a-benn gand eur chadenn houarn,
Gand nerz or halonou ha galloud on daouarn,
Da staga, da zerhel difiñv, didrouz, dinoaz,
An hini n’emaom ket en zoñj d’e laza c’hoaz,
Med d’e lakaad en beo da houzañv mil maro.
Ha ma teufe ‘r baotrez ha Nerzveur war eun dro ?

Hildeo

Me eo, pa laran dit, ‘m-eus prientet pep tra
En eur gemenn d’ar gwaz dond e-eun da genta,
Ar plah o heul war-hed pemzeg talmad atao,
O-daou, kred ahanon, e sentfont plên ha brao
Ouz kemennadurez ar sorser Touraniad.

Karnag

Ar pech, deuz ma welan, a zo bet stignet mad ;
N’eus ken nemed gortoz al loen da zond e-barz.
Kaer en-deus beza kreñv, birviken n’hallo harz.
A ! setu just a-walh on tri mignon o tond.
(*’N em gaoud a ra Gwadog, Penhorz ha Turluan*).

³⁶ Me ‘oar : bet skrivet “Mewar“ er skrid orin. Talvezoud a ra kement ha “sur“.

Trede pennad

Karnag, Hildeo, Gwadog, Penhorz, Turluan

An tri gadour

(En eur zegouezoud).

Prest da vale 'vidout da leh ma lari mond.

Karnag

N'eus ket da vond a bell³⁷.

Hildeo

(Savet war eur rohell).

Na da zale nemeur ;

Rag war-bouez pemp talmad ema erru Nerzveur.

Karnag

Bezom prest-mad d'e zegemer, ha diwallom :

Mar c'hwitom-ni warnañ, ne hwito ket warnom.

Kuzom 'dreg ar gwez braz an tosta d'ar feunteun ;

Ha pa zoubo e benn en dour, oll evel eun

E rafom a-gevred eur zaill war e horre.

Hildeo ha me hen chadenno 'vel ma tere,

Hag a brenno gand eur stouv kanab e henou.

'Vid ma tidrouzo deom gand e hopadennou,

Te 'grog' 'n e gleze, Gwadog, hag an daou all

'Viro ouz an daou benn anezañ da rual.

Hildeo

Intentet eo.

Gwadog

Mad eo.

Penhorz ha Turluan

Stard e vo kroget ennañ.

(Mond a reont oll da guz).

Karnag

Erru eo ; chomom sioul ha war evez bremañ.

³⁷ a bell : da bell.

Pevare pennad

Ar memez re kuzet. Nerzveur ouspenn.

Nerzveur

(E gleze ouz e gostez, e benn noaz, en eur zond war lez ar feunteun).

O ! feunteun dizanve³⁸, gand doujañs ‘n em gavan
‘Tal da vein braz gwisket a raden hag a van,
Dirag da zour brudet a-viskoaz da zougen
En e zonder lintruz barn an amourouzien.
E-leiz a Douraniz o-deus ‘baoe kantvedou
Klasket o zonkadur ennout ; war o roudou
E teu hirio Nerzveur, o zreher braz, devet
Gand ar memez arvar hag ar memez kleñved.
Ma n’ on ket e-keñver da bobl bet didruez,
Me ‘m-eus greet brao lezel e benn hag e vuhez
Gand ar marmouzig du ‘oa ‘vel roue warni,
Hag eñ tehet gand e gorvadig kasoni
Da guzad er Hoad-Meur ‘n eun toull logod bennag,
Neuze, mammenn dour yen...
(Eun trouz houarn a glever).

-Sell ‘ta ! ‘vel trouz eur stag

Pe eur chadenn houarn am-eus klevet aze...
Eur bod seh ‘n eun dervenn o terri marteze...
Neuze, feunteun, selaou ouz ar bedenn a ran :
Diskouez din breazon dremm an hini ‘garan.
A ! setu deut an heol da bara war an dour !
Degouezet eo ar poent merket gand an hudour.
(Daoulina a ra war dreuzou ar feunteun).
Med a-daol e kav din ‘teu va gwad da skorna,
Hag e tremen warnon ‘vel eur reuziad krena :
Daoust hag aon en-defe Nerzveur ? – An daou her-ze,
“Aon ha Nerzveur “ n’int ket ‘vid ‘n em glevoud tre-ze.
Fentuz ‘vefe gweled o kaoud aon an hini
A lak e-eun strolladou tud da spouroni !
Eur vez eo din chom da durlutal evel-henn :
Echuom ‘raog ma vo degouezet Ollvelen.
(Souba a ra e benn en dour ; kerkent, ar pemp Duard a lamm warnañ, a stag anezañ difiñv ha digomz ; n’en-deus ket amzer nemed da zorohal ha da stlepel, d’an douar, deg kammed dioutañ, Gwadog, an hini en-deus paket e gleze).

Karnag

(roet dezañ ar hleze).

Ahanta, poufer braz, debrer mel, c’hwezigell³⁹,
En berr amzer eh out diskennet gwall izel ;
Neb a lakae, ‘mezañ, ar bed oll da grena
N’eo ken barreg e-eun da ‘n em zigeliena⁴⁰ ;

³⁸ dizanve : disano.

³⁹ c’hwezigell : Notenn gand an oberour : “c’hwezigell“ a vez greet deuz eun den lorh braz ennañ.

⁴⁰ ‘n em zigeliena : di-geliena : kas kuit ar helien.

Bremañ, ramz fougeer, n'eus netra ken ennout :
Difiñv ha dilavar, dinerz ha dihalloud,
Kouezet etre daouarn eun Duard disprizet,
Bremazon e vo dit desket ha diskouezet
Petra 'hell ober eur marmouz, eur preñv-douar !
Kaer az-teus eonenni, bervi gand ar gounnar,
Klask ar hleze 'roas ken liez ar maro,
Ganin-me 'vo bremañ, dirazon e paro.
(Hag e lak ar hleze da lintra).
Glazluh, an houarn lemm a sponte tud gwechall,
Ha ne sponto den ebed ken....

Gwadog

(war evez).

Poent eo diwall :

Gweled a ran diou blah, diou Geltenn⁴¹ o tostaad.

Karnag

Kasom buan or fakadenn dindan ar hoad,
'Dreg ar roh vraz du-hont, ha manom oll kuzet
Da glevoud ar haoziou 'vo gand ar paotrezed.
(Dougen a reont Nerzveur dindan ar hoad, hag e chomont koachet).

Karnag

(kuzet).

Demdost 'int 'n em gavet. O ! na koant eo honnez
Gand he dremm dudiuz, he bale rouanez,
Hag ar gurunenn aour a ruill⁴² en-dro d'he fenn !

Hildeo

(kuzet).

Honnez eo an hini a laren dit : Ollvelen.

⁴¹ diou Geltenn : diou blah Kelt.

⁴² a ruill : a zo o korvigella (hervez an oberour).

Pempved pennad

Ar memez re, *kuzet* ; Ollvelen, Garrwenn.

Garrwenn

Den ebed !

Ollvelen

Sell ‘ta, den ? koulskoude bremazon
E valee ‘raogom, e benn uhel ha sonn.
N’hall ket beza teuziet.

Garrwenn

Nag eet gand eun hent all
D’ar gêr ?

Ollvelen

Nann, divizet en-doa chom da hedall,
Me ‘gred kentoh ema koachet, dre farserez,
‘N eun tu bennag ‘dreg ar gwez braz.

Garrwenn

(Pleget da zelled ouz an douar).

Pez a lerez

E vefen douget da gredi, ‘nez ma welan
Merket war an douar ‘vel roudou eun emgann.

Ollvelen

(O selled ivez).

Gwir eo : war ar yeot glaz mahet, pladet, turiet,
E zo bet, a daol sur, stourmet ha c’hoariet
Etre tud pe loened ; med, pa n’eus ket a wad,
Ar hann a zo bet, kredabl, ‘oa ket eur hann da vad.

Garrwenn

Ne gav ket dit zo bet amañ war an dachenn
Eur pezh korv gourvezet, ha bet en e gichenn,
Hervez ma tiskouez deom merkou treid tro-war-dro,
Tud hag a oa, moarvad, kuzet er Hoad dero ?
Ne welez ket pelloh, eet don en douar gwag,
Evel greet o tougen eun dra bounner bennag,
Ar memez roudou treid o tostaad d’ar wezeg ?
Amañ zo bet, ‘m-eus aon, gand eur gwall amezeg
Stignet eur pech trubard da Nerzveur.

Ollvelen

Didrouz din
Gand da gomzou diod ! N’hellez ket, divad din⁴³,

⁴³ divad din : bet skrivet “divadin“ er skrid orin. En eun doare siriuz.

Soñjal e vefe tud, nag e vent kant 'leh eun,
Nag e vije gantañ e benn 'barz ar feunteun,
Gouest da baka Nerzveur 'vel eun tamm ki bihan.
N'ouzout ket, 'med ma taol hennez e bao ledan,
E ve faoutet eur penn pe brevet eun ezel ?
N'az-teus ket hen gwelet war an dachenn vrezel
O winta kement tra, kement loen, kement den
A venne stourm outañ ? – Me ne gredin biken
'Hall beza bet Nerzveur pilet gand gwazed all.
Ha neuze, ouz eur haour ken mad, ken didamall,
Piou 'hallfe kemer droug na derhel kasoni ?

Garrwenn

Soñjal a ran e-touez ar Gelted n'eus hini
A gement na vefe ket dezañ mignon feal.
Med deg kammed ahann e krog eur Hoad teñval
'Leh ma zo 'n em dennet eun nebeud Touraniz
Gwelloh gante chom en noz du gand o frankiz
Eged beva dindan an heol ha dindan yeo.
Unan aneze, koareg e zremm, du-pod e vleo,
Bet, a-raog 'oam-ni deut, roue war an Donva,
En-deus brud da veza eur gwaz deuz ar hreñva,
Eur gwareger dispar, eur hadour galloudeg.

Ollvelen

Ya da, soñj a deu din : 'vel eun tammig touseg
O vond 'n eur ziskrapad⁴⁴ e gouzoug frank eun naer,
E welis anezañ savet pinouz en êr,
Daoust dezañ d'enebi gand treid ha gand daouarn,
Pa gouezas 'kreiz ar stourm dindan kraban houarn
Nerzveur ; ha, m'hen tou dit, ma vijes bet eno,
Ne vefe ket hirie ken leun all da heno'
Gand nerz hag ampartiz eun netraig a zen.

Garrwenn

Da Nerzveur e rankas plega, med d'ol lezenn
N'en-deus pleget biskoaz an Touraniad bleo du.
Digand or gedourien e tehas kuit dioustu,
Hag en e goad bremañ, droukoh 'vid loen ebed,
E ve, kredabl eo dit, noz-deiz gantañ stignet,
'Vel eur wareg noazuz, e spered ijin fall,
O klask ober deom oll ar muia poan ma hall.
Eun drougrañs sort ma zo dastumet 'n e galon,
Piou 'oar hag-eñ n'eo ket 'n em gavet bremazon
Da hoari da Nerzveur eun dro dreitour bennag ?
Tri gadour all : Fravel, Talmelen, ha Divag,
Hag a oa koulskoude kontet evel tri gwaz,
Deut amañ nevez 'zo, n'int distroet biskoaz.

⁴⁴ 'n eur ziskrapad : oh ober euz e wella evid nompas beza debret gand an naer.

Ollvelen

Kaer az-tevo, Garrwenn, kana din meuleudi
Duardig ar Hoad-Meur, biken n'hallin kredi
'Vije bet gouest da gas gantañ hep trouz na gwad
Ar galloudusa kaour 'zo bet en or broad.
Karoud 'rafen gweled, o tond e-mêz e goad
Hag o tispak aze dirag va daoulagad
Eur roue ken brudet ; hag e larfen dezañ
Pegement a zispriz hag a fae 'ran warnañ.

C'hwehved pennad

Ollvelen, Garrwenn, Karnag, Ar re all kuzet

Karnag

(O tispak a-daol euz dreg ar gwez).

Sentuz ouz galvadenn paotrez koant ar Gelted,
Setu dirag he dremm an Duard berr-mentet,
Disprizet deuz a-dost ha goapaet deuz a-bell,
An tamm roue dizarm, diarhen, diskabell,
Ha n'eo ken mestr nemed war an deñvalijenn.
'Velkent e valein lorhuz en ho kichenn
Da ziskouez deoh ho-tiou, ma 'peus c'hoant d'o gweled,
An oll draou sebezuz a guz en o goueled
Ar hoajou don lezet ganin bete vremañ.
Nerzveur, ne gredan ket e vefe droug ennañ
Diwar-benn ma teufed ganin d'ober eun dro :
Rag ne dle ket e garantez beza bero.

Ollvelen

Daoust ha te 'oar, marmouz, penaoz e kar hennez ?

Karnag

Ya : rag bremaig, goude ne oan ket war evez,
'Klevis 'trezeg amañ o sevel eur vouez kreñv ;
Ha me da zeredeg ha da guzad a-dreñv
Ar gwez dero tosta d'ar feunteun, ha neuze
Em-eus gwelet Nerzveur, 'n e zav war ar mên-ze,
Hag e hope war-bouez e benn : « Nann, feunteun goz,
N'em-eus, daoust d'an hudour, kredenn ebed d'ar gaoz
'Zo bet greet diwarnout gand ar bobl Touraniad.
Ne ran forz, kennebeud, pe 'vo gwir pe gaouiad
Ar seblañchou 'larer 'vez gwelet en ez tour ;
Ar sort c'hoariou-ze n'int ket deuz eur hadour.
Va zoñj 'zo greet ; va fenn ah aïo atao seh d'ar gêr,
Hag Ollvelen ne vo rannet dezi 'med eur ger :
Dimezi 'vid eur bloaz ganin pe klask eun all !
Ma 'defe c'hoant da stourm pe d'ober he fenn fall,
Kenkoulz merhed hag hi 'gavin c'hoaz da brena.
E leh chom d'he gortoz, skampom ahann brema' ! »
Hag eo tehet d'ar red gand ar garront koz-hont.

Ollvelen

Da gaoziou ken dibenn ne brizin ket respont :
Rag en ez taoulagad leun a drubarderez
E lugern evel gaou kement ger a lerez.

Garrwenn

Ha mar deo Nerzveur eet ken buan all en-dro,
Perag deuz ar feunteun beteg ar gwez dero

E weler ken mahet, ken turiet an douar ?

Karnag

(En eur zïroll da hoarzin).

A ! A ! A ! A ! A ! fall eh an war va diouharr,
Kemend a hoant c'hoarzin ma tegasez ennon !
Eun tamm krog a zo bet aze war al leton
Etre ma arz ha me, p'eo deut ar beure-mañ,
Evel ma teu bemdez, d'ar feunteun goz d'evañ.
O veza ma stourme da zistrei war e giz
D'ar hoad, em-eus stardet e houg 'tre va deg biz,
Roet eun tammig lamm dezañ, hag e staget
Du-hont ouz eur wezenn, ken na vo peurbleget
Ha tremenet dezañ e bennadou breskin.
Ni eo on-eus pladet ar yeot 'vid ar mintin ;
Med n'hallan ket miroud da gemer fent ha fars
Pa glevan ar fazi 'tre Nerzveur hag eun arz.
(Hag e c'hoarz adarre).

Ollvelen

Eun arzig gwall dister e rank hennez bezañ
Mar gall eur horr 'veldout dond a-benn anezañ.

Karnag

Meur a zen braz vije gantañ mouget buan.
Med te, heñvel, ne brizez ket an dud vihan,
Nag an dremmou disliou nag an daoulagad du.

Ollvelen

Me 'gar war an dremmou daou liou sklêr : gwenn ha ru'.
Me 'gar en daoulagad liou huñvreüz an neñv ;
Hag ar gwaz a blij din, mentet uhel ha kreñv,
A zo gwirion e gomz ha digor e galon.

Karnag

N'out ket fur ma kavez kaloneg ha gwirion
Ar hadour a lak tud war e lerh da zoned
Hag a deh digante 'vel eur had spouronet.
N'eo ket eun Duardig a rafe kemend-all ;
Nann, n'eo ket me 'lezfe ken brao plah da hedall
Ped loariad e karfen chom eureujet ganti.
A-hont, dindan ar hoad uhel, me 'm-eus eun ti
Touillet don en douar, bolzet gand mein ledan,
Ha bet ennañ berniet gand rouanez Touran,
Va zud-koz, abaoe ne 'oar den pegeid amzer,
Krehen, armou, podou, binviou diniver,
Pinvidigeziou sort n'az-teus gwelet biskoaz.
Ma kerez, Ollvelen, kemer 'hanon da waz,
An oll draou-ze 'vo dit da virviken, ha me,
'Vel eur beleg war ged noz-deiz 'tal e Zoue,

Evid lakaad 'hanout eürusa ma hellin,
Me da garo 'doug ar vuhez war va daoulin.
(*Klevoud a reer eur rohadenn hir, 'vel mouget*).

Garrwenn

Nerzveur ! toui 'rafen eo Nerzveur a glevan !

Ollvelen

Sodi 'rez ?

Karnag

(*En eur hoarzin*).

'Rabad deoh, paotrezed, ober van :

An arz, skuiz ouz ar stag, a glevit o krozal.
Med Garrwenn a gemer 'nezañ 'vid hennez all
A dle beza gwall bell abaoe 'n amzer ma red.
Nann, ni n'om ket ken disprizuz ouz ar merhed,
An Duarded 'hanom ; tan on daoulagad du
A zalh en or halon, divoug ha diludu,
Eur garantez na varv nemed pa varv an den.
A ! ma karjes fizioud ennañ da blanedenn,
Te dañvafe, merh ar Gelted, er hoajou braz,
Eur vuhez kaer sort na wel ket lagadou glaz.
Deus ganin, hag e vo dudiuz da zoare :
Va spered war evez a gavo bep beure
Da zidui 'hanout eur blijadur neve'.
D'an hañv, pa vo rouzet gand an heol ar mene',
Hag an dud er blênenn fêzet gand an dommder,
Ar Hoad-Meur a ginnigo deom en e zonder
Disheol, êzennou glan, douriou leun a besked,
Ha renadur al lestr 'vo dit buan desket.
Ha d'ar goañv, pa vo skorn hag erh war an douar,
An amzer 'vo deom-ni bepred tomm pe glouar
En or heo burzuduz, war grehen al loened.
Deus ganin, ma welo 'n hini 'n-deus da brenet
Pegen diod eo bet o hoapaad Ollvelen.
(*Eur rohadenn all, hirroh ha muioh goloet*).

Garrwenn

Mouez Nerzveur, 'laran dit, 'touez mil eh anavezfen.

Ollvelen

N'on ket evid kredi...

Karnag

(*En eur hopal*).

Deus 'ta ! c'hoaz eun taol boud,

Arzig, evid eur haour e kemerer 'hanout !
(*Eur rohadenn hirroh c'hoaz, mouget muioh-mui*).
Eun arz sentuz, deuz ma klevit, eo va hini ;

Hogen, ma c'hoantait kaoud gwelloh testeni,
Deuit tre 'barz ar hoad, hag e welfet ho-tiou
Mar deo Nerzveur hag eñ ar memez doare liou.

Ollvelen

Arz a-walh 'm-eus gwelet ha klevet evel-se :
N'em-bije ket soñjet 'hallfe beza morse
Eur marmouz, ha n'eus ket anezañ eun dornad,
Hag a gredfe sevel ouzin e zaoulagad.
Dalh da goad ha da noz, da steriou, da doullou,
Kee da ziwall arzed ha da veska poullou.
Ni 'h a gand doueed ar Vuhez hag an Hañv
Da glask an heol 'leh ma teu da sklêrijennañ.

Garrwenn

(E skouarn Ollvelen).

Marteze 'rajem mad, 'velkent, mond er Hoad-Meur :
Me 'zalh stard d'ar gredenn on-eus klevet Nerzveur.

Ollvelen

(E skouarn Garrwenn).

Ha nag e vefe gwir, evel na zoñjan ket,
E hallje beza bet Nerzveur gante paket,
Neuze 'vefe, kredabl, gwazed oh e ziwall ;
Ne hounezfem nemed lakaad paka diou all.
Deom d'ar gêr : mar deo bet an traou 'vel ma lerez,
Hemañ, m'hen tou, 'baeo ker e drubarderez.
(Ha kuit o-diou dre 'l leh m'int deut).

Seizved pennad

Karnag

(E-eun, droug ennañ).

Da gaoziou 'm-eus klevet penn-da-benn, paotrez koant,

Med ne valeo ket pep tra hervez da hoant.

Ober 'rez fae war eur garantez virvidig,

War eun den bet roue hag atao pinvidig,

Dre ma'z eo berr-mentet, ha du dremm ha lagad :

Da rogentez lorhuz 'gousto dit daelou gwad.

'Tre va daouarn ema an hini kreñv ha braz

A blij dit e halloud hag e zaoulagad glaz :

Gand ijin ar marmouz an nerz a zo trehet ;

Hag an daoulagad-se, karet gand ar merhed,

A-raog m'o-devo bet pok da vuzellou roz,

'Vo duoh 'vid va re, duoh evid an noz.

Trede arvest

(Dindan gwez uhel ar Hoad-Meur, war lez eur pez ster ledan dirag toull digor eur heo burzuduz. En eur horn, eur wrahellig lann pe geuneud).

Kenta pennad

Nerzveur

(E-eun ; chadennet ha dall, azezet war gev eun dervenn gouezet).

Eet eo 'velkent, va femp bourreo diwar va zro...

Pellaad a ra du-hont o skrignadeg haro.

O weled 'hanon dall 'zo stad enne meurbed ;

Hogen ar pez e oant o klask n'o-deus ket bet :

N'eus hini 'bed aneze, dremm pleget 'uz d'am foan,

Dizoloet warnon na krenadenn na doan,

Klevet ar gomz verra nag an disterra klemm,

Pa zalhe an hudour, gand e gontell beg lemm,

Da skei kant ha kant taol en-dro da beb lagad

A-raog tenna 'nezañ euz a-greiz eun toull gwad.

Pebez euz ! Sevel 'ree warnon eur hwezenn yen ;

Ha bodet en-dro din 'kleven va bourrevien,

'Vel mezvijen⁴⁵ gand eul levenez hudur,

O skrijal, o tañsal, o suna plijadur !

Eun eürusted dispar 'vije bet o hini

Ma vijen dirake deut da fallgaloni.

Med, o veza manet dizeblant ouz ar boan,

Emaon savet, 'gav din, brasoh kaour 'vid na oan ;

Hag enebour ebed n'halla biken lared

'Vo bet va halonder eun herrad diskaret.

Ar boan n'eo sort, hag an daoulagad 'm-eus kollet

Er Wennva beurbaduz a vo din restaolet.

Ollvelen, va muia-karet, ne welin ken ;

Med em eñvor 'chomo garanet da viken

He dremm ken koant, dousder dudiuz ar c'hoarzin

He-deu greet ar baotrez er beure-mañ ouzin

Pa on-eus kimiadet an eil gand egile.

Ha ne deufe nepred Ollvelen em gwele,

Ne virin diwarni 'med soñjou kuñv ha brao,

Hag em houn e vevo koant, flamm, yaouank atao.

Med hi diwar va fenn daoust petra 'dle soñjal ?

Ma teufe dezi gweled 'hanon euzuz ha dall,

Trehet gand pemp denig deuz ar re zisterra,

Eet va brud-vad da goll, va galloud da netra,

Ha dreist-oll dilamet diganin va hleze,

Daoust hag hi deuz eur haour kouezet ken izel-ze

Ne gemerfe ket heug, ha dispriz hag ankoua⁴⁶ ?

'Vel eur vantell bounner sammet war an diouskoa',

⁴⁵ mezvijen^{net} : badaouet.

⁴⁶ ankoua : ankounah.

E talh ar mennoz-se da waska va spered
Ha d'ober din eur boan wasoh 'vid n'en-deus greet
An hudour Touraniad gand e daoliou kontell...
Setu din eun distokadenn hag eur gentel :
Dre fizioud en peb den ha kredi peb lavar
'Maon lakaet dindan treid tra ma vin war zouar...
Eur baleer didrouz a glevan o tostaad ;
Moarvad, va Duardig o tistrei d'am goapaad.

Eil pennad

Nerzveur, Karnag

Karnag

Penaoz e kerz ar bed gand va mignon Nerzveur ?
Plijoud a ra dezañ degemer ar Hoad-Meur ?
Ne gomz ket ? – Koulskoude ‘ma e deod gantañ c’hoaz ;
Ne laran ket, avad, e vo gantañ warhoaz :
Rag an hudour, akuit da cheñch doare d’an dud,
‘Vite da veza dall, ‘zo gouest d’o degas mud.
Deus ‘ta, va faotr, dispak hirio, p’hellez ober,
An teod ken helavar barnet da zond emberr
Da heul da zaoulagad ‘n eur jarlig koueor melen,
Hag a vo kinniget d’ar vraoa fumelenn
Bet biskoaz en Donva, pa deuo davedon,
‘Vel m’he-deus roet din da houzoud breamazon.

Nerzveur

(Savet a-daol).

Petra lerez, trubard ? – Petore gaou neve’
En ez kenou freget a ziwan adarre ?

Karnag

Ar wirionez, paotr brao, Hildeo ‘zo bet du-hont
Hag en-deus ‘n eur zistrei, degaset din respont
Ollvelen : « An hini ‘zo bet treh d’ar Helt braz,
Hennez hepken, emezi, ‘vo din-me mestr ha gwaz ;
Lar da Garnag eta ‘teuin warhoaz da noz
Ganez-te d’ar Hoad-Meur, hag ema va mennoz
E gemer da bried heb rankoud mond d’an dour. »
Ar helou-ze, degaset din gand an hudour,
O-deus lakaet ennon kemend a levenez
‘Vel en eur roue meur o kemer rouanez :
Troet e vo bremañ ‘n eun deiz kaer alaouret
An noz du ma veven enni ‘vel douaret,
Ollvelen ‘vo, me ‘gred, brao-tre beva ganti :
Difonn e vo da gomz ha buan da zenti ;
Prim e tesko ganin hemolhi, ren eul lestr,
Hag e vo stad enni beva dindan eur mestr.
Ober ‘ray, a daol zur, eur barez a-zoare,
N’en-do ket leh he far da glemm war an ere.
Petra larez-te din, Nerzveur, war an tamm-ze,
Pa anavezez ar plah ? – Deus ‘ta, paotr braz, kaoze.

Nerzveur

Dijal⁴⁷ ‘m-eus gouzañvet tenna va daoulagad,
N’eo ket gand kaoziou skuiz⁴⁸ e teuin da fallaad.

⁴⁷ Dijal : dizoursi.

Fentuz 'n hini 'kavan soñjal en eun daolenn
Sort ma rafe Karnag e-kichenn Ollvelen,
Ar vran e-tal ar goulm, an noz e-tal an deiz,
Ar gaou laosk ha mezeg dirag ar wirionez.
Te n'out bet ha ne vi nemed eur bourrevier,
Mad da skei deuz a bell ha da liva gevier ;
Hag Ollvelen, enor ha fleurenn va broad,
Gwirion evel an heol, Keltez penn-kil-ha-troad,
Ouz eur gwaz a sort dit n'hallfe nemed heugi
'Vel ma rafe dirag eun touseg eur hadki.

Karnag

Te, 'vad, pemoh daou droad, a zo re hir da deod ;
Warhoaz, pa vo trohet ha taolet 'mesk ar yeot,
Ne brizo an touseg na ki selled outañ.

Nerzveur

Setu kavet ganit an doare distartañ
Da viroud ouz moueziou displijuz da zevel.
Va hini 'ta, diwar warhoaz, 'ranko tevel
Ma ne deu tra, na den, na doue d'am difenn.
Hogen, m'hen tou, goude ne chomfe ken em fenn
Teod na lagad, komz na gweled, n'eo ket ganit
E teufe c'hoaz dirag Ollvelen ar gounid ;
Ha war va gwele gwad nag e ven astennet,
O neuial em herhenn gwizi pe kaouenned,
Paotrez koant ar Gelted a bokfe din-me c'hoaz
Gand he moue melen-aour hag he diou sterenn hlaz ;
'Leh te, nag e tougfes eun doneg arhant gwenn,
Armou lufre 'n ez taouarn, dremm dihloaz ha laouen,
Ne vefes eviti 'med eun dilostadenn⁴⁹
Mad da flastra gand treid 'vel eur bodig raden.

Karnag

(Fuloret).

Re oll a hoaperez a ver euz da henou,
Hag hebdale...

⁴⁸ skuiz : digar.

⁴⁹ eun dilostadenn :Notenn gand an oberour : c'hwiltous.

Trede pennad

Nerzveur, Karnag, Hildeo

Hildeo

(O tond d'ar red hag o sacha Karnag a-gostez).

Poent eo deom klask on difennou :

‘M-eus aon e teu Kelted warnom a-dreuz d’ar Hoad.

Karnag

Petra lerez, Kelted ?

Hildeo

N’eus nemed o broad

A gement ‘hallfe kaoud digarez d’on taga.

O veza ‘ta klevet bremazon o koaga

Eur vran kreñfoh he mouez evid mouez ar re all,

Ha trouz ‘vel hini tud strollet o kaozeal

Izelig etreze, ‘m-eus soñjet ‘n eur hadvran⁵⁰

O ren brezelourien diwar moged on tan.

Hogen, eun harzadenn dreist-oll ‘m-eus anavezet :

Hini Tonk, ar hadki bet ganin pareet

Nevez zo ‘ti Nerzveur ; heb mar, kent ma vo pell,

E tirollo warnom eur gwall barrad avel.

Hag evel a-ratoz, deom on-daou e tegouez

Ar stourm, eet an tri all d’hemolhi an tirvi gouez,

Dister en em gavim ouz ar strollad Kelted.

Nerzveur

(Dezañ e-eun).

Daoust en o hoariou petra ‘zo difoeltret ,

Ma valefe pep tra hervez ma oant en zell,

‘Vijent ket diouzin pellaet da gomz izel.

Hildeo

(Atao a-gostez ha gand Karnag).

Hag ar pezh korv lor-ze, petra ‘vo greet outañ ?

Laha ‘nezañ, ha tehel kuit “helli gentañ⁵¹“ ?

Karnag

Lah anezañ, hudour, ha skamp kuit, ma kerez,

Pa ne lar dit netra kaerroh da zorserez.

Me ‘chomo da laha pe da veza lahet,

Ha ne vo ket ganin gwad va zud-koz nahet.

(Hildeo a dosta ouz Nerzveur, savet e gontell da skei, pa glever damdost eun harzadenn bounner. Nerzveur, oh anavezoud e gi Tonk, a lak dre eun taol nerz dreist-denel e chadenn da derri, ha savet en e za, a hij anezi en-dro dezañ en eur hopal).

⁵⁰ hadvran : eur vran gouest d’en em ganna.

⁵¹ helli gentañ : an hini a yelo kuit ar buanna.

Nerzveur

Amañ, Kelted, amañ, va zud, amañ, va hi !
War an tu-mañ 'kavfet brao d'hemolhi.

Karnag

(En eur vond d'ar heo d'ar red, e-pad ma teh Hildeo dindan ar hoad).
Gortoz, kaer az-tevo hija da chadennoù,
Me 'zerro dit bremaig dor ar youhadennou.

Nerzveur

Deus pa giri beteg amañ, marmouzig fall,
Ma vo ar stourm-c'hoari desket dit gand eun dall.

Pevare pennad

Nerzveur, Karnag

hag o tispak euz dindan ar hoad :

Ollvelen, Garrwenn, Penndrask, Rutan, Skoazeg, Kreñvbost

Karnag

(O tistrei gand e wareg stignet, a wel e hoar o tispak da genta).

A ! trubarderez ar foeltr, va hoar eo ‘n hini ro

Heñchamant⁵² ha skoazell d’enebourien or bro ?

Kee dizale da glask digand on doueed

Ar gopr a zo ganit ken leal gounezet.

(Hag e tenn).

Penndrask

(En eur goueza d’an douar, tizet en he hreiz gand bir he breur).

‘Ma va maro ganin, med e varvan seder

Pa ‘m-eus troet diwar Nerzveur taol ar meder⁵³.

(Hag e varv ouz treid Nerzveur).

Nerzveur

Trugarez dit, ha meuleudi war da ano !

Bleuniou koant an eñvor ‘vidout a ziwano,

Merh yaouank Touraniz : rag goud ouzon bremañ

Ouz piou ‘n hini ‘oa deut da galon da dommañ.

Karnag

(En eur zevel adarre e wareg troet war-zu Nerzveur).

Da hini-te, marh dall, ne dommo ket nemeur :

Lared ‘hall Ollvelen kenavo da Nerzveur.

(Med, a-raog tenna, ema kroget, paket, liammet gand ar pemp Kelt, Ollvelen o sacha e wareg digantañ).

Ollvelen

(O vond d’e skei gand he hleze).

Te ‘laro da genta kenavo d’ar vuhez,

Teuz an oberou noz, bourrevier didruez !

Garrwenn

(En eur gregi en he breh).

Nann, Ollvelen, n’ez ket da laha ‘nezañ c’hoaz :

N’eo ket dleet d’hennez mervel evel eur gwaz.

Greom deuz ma venno Nerzveur.

Ollvelen

Gwir a lerez.

⁵² Heñchamant : lavared dezo penaoz ober, penaoz mond war-raog.

⁵³ taol ar meder : Notenn gand an oberour : “taol ar maro“. Keñveriet e vez ar brezelour a laz ouz eur meder.

(O tistrei gand Garrwenn war-zu Nerzveur, e lamm da bokad dezañ ; an tri gwaz a chom da ziwall Karnag).

Ha te, va mignon ollgaret, penaoz e rez ?

(Dezi heh-eun).

O ! divaload tud ! gwada 'nezañ 'deus greet ;
Med arabad 'ouezfe an dizremm⁵⁴ m'eo lakaet.

Nerzveur

Brao-tre emañ, ken brao ma soñjan huñvreal.
Trugarez dit, ha da Benndrask, ha d'ar re all !
Med n'ouzon ket, siwaz ! piou da drugarekaad.

Ollvelen

Biken, 'nez da Benndrask, n'o-ije gallet kad⁵⁵
An dachenn bellguzet 'oa degaset enni.
A ! setu an daou all o tond gand an hini
'Oa tehet dindan 'r hoad.

⁵⁴ an dizremm : dizremmet, disneuziet e zremm.

⁵⁵ kad : kavoud.

Pempved pennad

Ar memez re, Arzduf, Pradou,

Hildeo (*dalhet gante*).

(*Hag ar hadki Tonk, a deu dioustu da lampad gand e vestr*).

Nerzveur

Mignon feal d'an den,

Deuz a-bell em-eus anavezet da chilpadenn.

(*D'Ollvelen*).

Piou a lerez a zo paket da ziweza ?

Ollvelen

An hudour koz 'oa bet kirieg dit da goueza

'Tre daouarn an Duard. Tehet kuit 'vel eul laer,

O houzoud⁵⁶ mad 'n eur chom e gont a vije sklêr,

N'eo ket bet eet a-bell 'raog Arzduf ha Pradou,

Hag ar hi Tonk lampet dioustu war o roudou.

Nerzveur

Eun taol fall 'vije bet e lezel da vale :

Rag em heñvder eo bet droukoh 'vid egile.

Pere 'zo c'hoaz ganit ?

Ollvelen

Va mignonez Garrwenn,

Rutan, Skoazeg, Kreñvbost, deut oll prim ha laouen

Da ginnig harp o breh kerkent m'o-doa klevet

An darvoud sebezuz 'oa ganit en em gavet.

Rutan

Hag emaoom prest, Nerzveur, da rei da bep hini

Deuz an daou dreitour-mañ ar gopr ma kemenni.

Nerzveur

Mil drugarez deoh oll euz a zeun va halon,

O veza n'hoh-eus ket disprizet ahanon,

Daoust din da veza deut ken gwan ha ken izel

A-greiz ma talhe stag an Treh ouz va hazell !

Med an hini 'n-eus ket na kleze na lagad,

Eet digantañ stered ha luhed an argad,

Henez n'eo mad da ren na da gemenn netra

Diwar-benn laha tud. Grit deuz ho kiz eta,

Kadourien didamall, ouz an daou lankon-ze.

Ollvelen

Kenta tra 'zo d'ober eo kerhad da gleze ;

Ha pa vo distroet Glazluh en ez taouarn

⁵⁶ O houzoud : fazi bet greet a-bell 'zo, diwar levezon ar galleg. "Pa ouie".

O kana dit gwerziou gallouduz an houarn,
Te ‘gomzo, te ‘reno, te ‘vo mestr adarre,
Ha deuz ar soñjou du da virviken pare.
Gortoz ma tennin ar chadennig arem flour
Eo bet keid-all ar hleze-meur a skourr⁵⁷.
(Distaga a ra ar chadennig diouz gouriz Nerzveur).
Gand houmañ, Tonk, Gwarrwenn ha me, ‘gavo dioustu
Glazduh ‘n eur horn bennag euz keo ar marmouz du.

Nerzveur

It eta, paotrezed ; fiziañs am-eus, ho-tri
E kavfet dre lagad, dre spered ha dre fri
An houarn sakr a zizehan pell dioutañ.

Garrwenn

Me ‘zoñj e tispako ganeom an dro gentañ.

Karnag

(Goapaer).

Klaskit piz, merhed koant, ha furchit gand aket ;
Houarn hir ar marh mel⁵⁸ ganeoh ne deui ket.

Ollvelen

Chom peoh aze, preñvig ; hebdale ‘vo da dro.
Neuze ne vi na ken goapaer na ken faro.
(O-diou eh eont er heo gand ar hi, en eur astenn dindan e fri ar chadennig).

Arzduf

(En eur zevel diwar an douar chadenn Nerzveur).

Daoust peleh zo bet greet eur chadenn ken pounner⁵⁹
Ha ken kreñv hag houmañ ? – Loug⁶⁰, ar mestr houarner,
Ne raje ket e-eun kaletoh pezh labour.

Nerzveur

E-doug ma oan dindan galloud an enebour,
‘M-eus klevet an hudour, meur a wech gand ar gaoz
En-doa lakaet he govelia gand Hermen goz,
On aremer⁶¹ deom-ni, digarez huala
Pe tirvi dizoñvuz pe zaout diêz d’hala,
Pa’h aje war o zro ‘vel pareer loened.
Kaoud a ra din ‘ma e dro da veza chadennet
Gand ar chadenn am-eus-me douget betek-henn.

Arzduf

Mad ! bremaig ‘vo stardet evel eur wadegenn⁶²,

⁵⁷ a skourr : “skourret”, lakaet e oa bet ar hleze ouz ar chadenn.

⁵⁸ ar marh mel : Notenn gand an oberour : eur marh a blij dezañ ar brud kement-ha-kement.

⁵⁹ peleh zo bet greet eur chadenn ken pounner : “zo”, “eo” er skrid-orin. Gwelloh e vefe bet ober gand “ez eus” pa’z eo amresiz ar rener. A-hed ar skrid e ra an oberour gand “zo”, evel ma vez greet e meur a leh e-leh “ez eus”.

⁶⁰ Loug : Notenn gand an oberour : “Lug” doue meur a arz, dresit-oll hini ar metalou.

⁶¹ aremer : an hini a ra arem.

Ma vo difiñv evid gortoz beza tanet⁶³.
(*Hag e chadenn anezañ stard*).

Ollvelen

(*O tistrei d'ar red*).

Kerkent m'om eet er heo, ar hadki 'zo manet
A-daol en eur grozal, harzal ha diskrapad,
Dirag eur pezh rohell hag e vije arabad
Deom on-diou, na diou all ganeom, klask he sevel,
Astennet 'vel m'ema 'kreiz an dachenn, heñvel
Ouz eun arz didroadeg⁶⁴ chomet eno kousket.
Glazluh a dle beza dindan honnez kuzet ;
Ha, 'benn renta d'ar hleze-meur e librente',
'Vo red dispak eun nerz evel da hini-te.

Nerzveur

Gwelom ha gouest on c'hoaz da zibrada reier,
Ha da zevel an noz⁶⁵ diwar ar hlezeier.

Ollvelen

(*En eur hoarzin*).

Deom on-daou skoaz-ha-skoaz, breh-ha-breh, dorn-ha-dorn,
Ma raio an Duard ouzom lagad a-gorn.
(*Hag eh eont d'ar heo, dorn an eil e dorn egile*).

Karnag

D'ober lagad a-gorn e vefe nehet braz
An hini na chom gantañ 'med daou doull raz⁶⁶.

Kreñvbost

Arabad dit goapaad neb az-teus lakaet dall ;
Ne vefen ket a-bell 'h ober kemend-all.

Skoazeg

Gand pebez plijadur e welfen an daou-mañ
Tanfoeltret e-kreiz eur fornigell da dommañ !
A ! Set' aze Nerzveur, ha gantañ e gleze.
(*Nerzveur, krog en e gleze, a zistro gand Ollvelen o ren anezañ, Garrwenn ha Tonk*).

Nerzveur

(*Astennet e zorn dehou war Glazluh*).

Bremañ, Glazluh, p'emaon krog ennout a-neve',
'Vidon da veza fêz, 'vidon da veza dall,
E santan o tiskenn ennon eur spered all :
Spered an emgannou kaouruz⁶⁷, spered an Treh.

⁶² eur wadigenn : gwadigou (unan nemetken).

⁶³ tanet : lakaet e-barz an tan.

⁶⁴ didroadeg : heb troad.

⁶⁵ da zevel an noz : da gas kuit an noz a zo war ar hlezeier.

⁶⁶ daou doull raz : galleg. Ne weler netra da vad en o flas.

⁶⁷ kaouruz : gouroneg, kadarn.

Kaoud a ra din a zo⁶⁸ ganit stag ouz va breh
Eun nerz all uhelloh ‘vid nerz an izili ;
Kaoud a ra din ganit eo kresket va beli
Ha va gwir da gomz kreñv e-touez ar gadourien.
Tevel am-eus gallet pa oa torfetourien,
Goude beza warnout taolet o daouarn louz,
O tenna din va daoulagad. Bet on didrouz
Da houzañv mez ha poan ; med ar houlz a zo deut
Da rei da bep hini bara deuz e gont bleud⁶⁹.
Paket ez eo ganeoh va zud, koz Duarded,
N’o-deus ket em heñver nemed displealded
Ha krizder divuzul. Aze ‘ma an hudour,
Eet a-bell ‘zo ganeom e-mêz a enebour,
Savet gand or roue dreist ar vedisined,
Fiziet ennañ yehed on zud hag ol loened,
Hag a grede lakaad aoza ‘n or hovel-ni
Ar chadenn ‘m-eus gallet dond a-benn d’he zerri.
Gantañ ‘oe prientet honnez ‘vid va staga,
Ar gaou d’am zacha pell, an doare d’am zaga ;
Ha digantañ ‘m-eus bet, ne naho ket, moarvad,
Tremen kant taol kontell ‘vid tenna peb lagad.
Larit-hu din, va zud, pesort gopr a rofet
D’eun den bet ken treitour, ken laosk en e dorfed,
Savet en e grizder d’ar bazenn diweza ?

Ar Gelted

(Oll en eur vouez).

An tan, an tan hepken ‘zo gouest d’e gastiza.

Hildeo

Truez, truez, tud vad ! me n’on bet ‘med an dorn ;
Kement-se ne dalv ket beza taolet er forn.
Truez, mar deus ennoh eun tamm kalon bennag,
Pa n’em-eus greet netra ‘med war gemenn Karnag !

Ar Gelted

(En eur vouez).

D’an tan an oan spontig a gren rag ar maro !

Karnag

An dro-mañ ne ran ket ganit eur paotr faro :
Mez am-eus evidout, eun hudour, eur hoziad,
Hag a zoug ken izel an ano Touraniad ;
Ma vije ket ouzin ar fiñval difennet,
Da henou, m’hen tou dit, ‘vije buan prennet.

Nerzveur

Hennez all, ken uhel bremañ ar gaoz gantañ,

⁶⁸ a zo : ez eus.

⁶⁹ Da rei da bep hini bara deuz e gont bleud : rei da bep hini toud ar bara bet greet gand ar bleud e-noa roet.

A zo bet penn-kirieg ha kabluz da gentañ.
Me ‘garje goud perag eo bet ken didruez
Ouz an hini ‘n-doa bet espernet e vuhez ?

Karnag

Tanfoeltr espern n’am-eus-me klasket diganit :
Te ree da hiz pa vezes krog en tu gounid,
Me ‘m-eus greet va hini p’emaon deut war horre.
Bremañ, degouezet dit an tu kreñv adarre,
Gra din ‘vel ma kiri ; me ‘zo prest da vervel
Diglemm, eüruz zoken : rag va lagad a wel,
Hag a welo keit ha ma talho sklêrijenn,
Eun dremm guzet ouzit, dremm skeduz Ollvelen.

Ollvelen

(Droug enni).

Ne baro ket a-bell warnon da lagad du :
Hebdale ‘vi troet en eun dornad ludu.

Ar Gelted all

D’an tan an daou Zuard, d’an tan ar vourrevien !

Nerzveur

Ar varn a zo douget : evel torfetourien
E tle mervel an dud digalon ha direiz.
M’o-dije bet dalhet an eeunder en o hreiz,
Stourmet evel ma stourm “mibien doue Dana⁷⁰“,
O-dije bet ganeom enor an dibenna ;
O hlopennou, gwisket en arhant hag en aour,
Miret en arh kranna⁷¹ dindan toenn ar haour,
‘Vije deut da veza, en amzeriou da zond,
Skwer ha kentel baduz d’ar gadourien dispont.
Med, o veza n’eus bet enne ‘med fallente’,
Ne bleustro birviken soñj ar re veo gante :
O foultrenn ah aio da goll ‘mesk an douar,
Hag o eñvor, da heul ar vogedenn glouar,
Gwentet⁷² gand an ankounah koulz ha gand an avel,
A deho kuit dindan ar goabrenn da vervel.

Karnag

Pa n’on ken evid stourm nag evid ‘n em zifenn,
Ne vern ket Petra ‘ri ganin pe gand va fenn.
Me ‘vo buan ankounac’haet, med ankounac’haad ne rin ket,
Forz peleh na pegeid ‘vo va ludu strinket,
An dremm goant dudiuz eet ken don em halon
Abaoe m’eo kouezet sell he lagad glaz warnon.

⁷⁰ mibien doue Dana : Notennn gand an oberour : evel-se e veze greet anezo gand ar Gelted.

⁷¹ kranna : kaerra.

⁷² Gwentet : kaset. Deuz ar ger koz “gwent“ = avel.

Ollvelen

(Gand dispriz).

Mall am-eus da weled an tan 'n e garante' :

Ar sort tud-mañ 'zo mez beza karet gante.

Ar Gelted all

Tan d'an Duarded laosk, tan d'an amprevaned !

Nerzveur

Ya : da vervel dre dan int bet ganeoh barnet.

Ra vint taolet eta, liammet stard, en-beo,

Ha c'hwezet eun tantad warne tre 'barz ar heo,

Evid ma vo devet war eun heveleb tro

Kement 'hallfe derhel koun hag eñvor o bro.

Pinvidigeziou-mor 'ouzon mad 'zo aze ;

Hogen, pa n'int ket bet gounezet dre gleze,

E vefe greet da Douraniz re vraz enor

Ma teufem-ni da binvidikaad gand o zeñzor ?

Kerhom hepken diwar o houst eur hrohenn arz,

Unan frank, tomm ha teo, ma vo paket e-barz

Ar valhenn⁷³ 'zo marvet evidon da veva.

Ollvelen

Greet e vo penn-da-benn, Nerzveur, 'vel ma lerez ;

Me 'h a war-eeun da glask eur hrohenn d'ar baotrez.

(Hag hi d'ar heo).

Garrwenn

Amañ zo dastumet berniou keuneud ha lann,

Hag a-flammijennou dioustu seder ha splann.

Dougom aneze d'ar heo da zevel an tantad.

(Garrwenn, Rutan, Skoazeg, Pradou ah a da gerhad danvez tan).

(Arzduf ha Kreñvbost a zoug an Duarded, krog unan e peb penn).

Kreñvbost

(O kregi en Karnag da genta).

An uhelidi-mañ eo dleet deze tostaad

Ouz an tan ; ha, peogwir int dalhet 'n o bale,

Beteg al leh enor 'vint douget hebdale.

Hildeo

(Pa groger ennañ).

Me 'zo barreg, paotred, mar 'pez ouzin truez,

Da bep hini 'hanoh da hirraad e vuhez.

Arzduf

Mad ! p'emaout ken akuit, setu 'vidout bremañ

Eur poent brao da hirraad da hini da gentañ.

⁷³ Ar valhenn : ar plah valh.

Ollvelen

(O tizrei gand eur pezh krohenn arz).

Kavet 'm-eus da Benndrask eur vantell a-zoare.

Nerzveur

'Vid an hini varo 'laran dit : Trugare' !

Kreñvbost

An tantad a zo prest, an daou ganfart 'n e greiz.

Nerzveur

C'hwez eta d'an tan ruz, ma lammo war e breiz !

(An tan, enaouet kercent gand Kreñvbost, a glever o strakal).

Hildeo

(War-bouez e benn).

O ! tud gouez ! Pegen kriz eo mervel evel-henn !

Karnag

Ganit hepken ema va mennoz, Ollvelen,

Hag e tiouganen dit : « Kenavo dizale ! »

Rag ne vo ket hemañ va diweza gwele.

(Eun nebeud klemmou a glever c'hoaz, ha goude ne glever ken netra).

Nerzveur

Tavet eo da viken o moueziou milliget ;

O speredou gaouiad, nijet kuit en maged,

A zo gante dizohet o labour divalo.

Ha bremañ, mar kirit, mignonned, ni 'zavo

D'an doueed a gas ar Gelted war greñvaad

Eur han a drugarez hag anaoudegez vad.

Ar Gelted oll a gan**Kan emgann an Doueed**

(War don : Sao, Breiz-Izel).

I

Galloudegeziou an izlonk teñval,

'N em glevet oll 'vid ober fall,

Astennet warne lenn an noz du-dall,

A grog da stourm en eur yudal ;

Mouez vraz ar Bed, kant leo tro-war-dro,

A harm d'ar Maro *(bis)*

II

Ar mor kounnaret e taoulamm warnañ

Kazekenned gwenn Manannañ⁷⁴ ;
Hag ar Penn-Gwadeg, 'kreiz an oabl ledan,
War e garr herruz heb ehan
A ruill, a ruill, a halv da zevel
Kurun hag avel (*bis*).

III

An avel garo, deuz e wele kled
Savet a-daol, a deu d'ar red ;
Eet eo pennfollet treuz-didreuz d'ar Bed,
Gantañ mil mouez klemmuz-meurbed ;
Ar gwez gwintet a gouez d'an douar
Dindan e gounnar. (*bis*)

IV

Mouez pounner Taran, gourdrouzuz o son,
A lak ar saoniou da ziston ;
Ha tan e lagad beteg ar galon
A zoug ar spont hag ar spouron ;
E leh ma taol e bao didruez,
Ken,⁷⁵ 'vo d'ar Vuhez ! (*bis*)

V

Glaou puill ha grizill beb eil a ziskenn
Skuillet dre gant mil eienenn ;
Steriou dihlanniet a veuz ar blênenn
Troet oll en eul lenn hepken.
'Eneb an trouz, an droug hag an dour
Piou 'vo da gadour ? (*bis*)

VI

An Heol, o sevel ruz 'vel eur rod-tan,
A sklêrijenn ar menez glan ;
Ha war e gribenn an doueed splann
'Zo 'n em vodet 'vid an emgann ;
Son an drompill, atao war greñvaad,
A houl draill ha gwad. (*bis*)

VII

Ar hirri brezel, ahel hag ahel,
Stag oute kezeg divarvel,
Gand krap rohellig an dorgenn uhel
A ziruill ken prim hag avel,
Er penn kenta Nuz hag e baotred
O vond a-gevred. (*bis*)

VIII

O bleuniou melen war o diouskoaz gwenn,

⁷⁴ Manannañ : ?

⁷⁵ Ken' : kenavo.

O dremmou skeduz ha laouen,
An doueed vad gand ar gompezen
A red 'n eur hopal war-bouez-penn,
A hij dindan an oabl o tond glaz
O hlezeier noaz. (*bis*).

IX

Dre ma tremenont, 'sav war o roudou
Diwan glazur ha bokedou ;
Diwar ar blênenn e teh an douriou
Adkemeret gand ar steriou ;
Kant mil lapous a grog da ganañ
Kanaouenn an Hañv. (*bis*)

X

Tavet an avel, sederraet ar hoad,
Serret gand Taran e lagad,
Eun êzenn glouar ha leun a hwez-vad
A lak pep tra da yaouankaad ;
War dremm ar Bed e c'hoarz a-nevez
Sklêrder ha buhez. (*bis*)

XI

An deiz 'zo treh war an Noz teñval
Hag ar re vad war ar re fall ;
Kadourien Gonan, tehet 'n eur youhal
Dindan douar e toullou dall,
A glask hag a zastum adarre
Koumoul hag arne. (*bis*)

XII

Bet eo ar Gelted harpet a-viskoaz
Gand an Doueed koant ha braz,
O bleo alaouret, o daoulagad glaz,
Deut an Treh d'o heul eur wech c'hoaz
Hag e kanom da drugarekaad
An Doueed vad. (*bis*)

Garrwenn

Da Gatu-Bodua⁷⁶ 'tleom ivez restaol
Eñvor ha trugarez : rag gand honnez dreist-oll
Ha gand Penndrask om bet heñchet 'vid ar beure
Da zond beteg amañ. Eur vran gaer a deue
Penn-da-benn a-raokom, sioul e-pad ar bale,
Koaguz⁷⁷ pa vije greet an disterra dale

⁷⁶ Da Gatu-Bodua : Notenn gand an oberour : Katu-Botua, doueez ar brezel. Lavared a reed en em lakae aliez e stumm eur vran.

⁷⁷ Koaguz : o koaga.

Skoazeg

Ya, taolet em-eus pled er vran-ze, du lintruz,
Brasoh mentet hag eur vouez dezi muioh skiltruz
Evid ne gustum kaoud er vro-mañ ar brini ;
Hag anad eo 'oa deut a-ratoz 'viodm-ni
Peogwir, eur wech erru, ne weljom bran 'bed ken.

Nerzveur

Trugarez d'ar Valhenn ha d'ar Galonekenn
Bet a-du gand ar haour a beb amzer troet !
Da bep hini 'hanoh ivez ra vo roet
Eul lodenn divuzul euz grad-vad va halon !
Med an hini 'droas an taol bir diwarnon,
Hag hi ledet aze didrouz war an dachenn,
E-kreiz he yaouankiz yenet da virviken,
Honnez ne vo morse ganin ankounac'haet ;
Hag emberr e douar an Donva 'vo lakaet
D'ober he housk e-tal ar wella kadourien
A roas deom an treh war on enebourien.
Pebez enor 'vo dezi, din-me petore mez
Pa vefom arvestet gand or meuriad a-bez,
Tud koz ha tud yaouank, merhed ha bugale,
Deredet a bep tu d'intent gand on doare !
Daoust petra ne vo ket laret diwar va fenn
Pa vo gwelet ne vin ken gouest d'en em zifenn,
Pa vo klevet 'vin bet paket 'vel eur bugel,
'Tre daouarn Touraniz troet en hoariell,
Friket gante brud-vad ha kaerder va ano ?
Neuze 'teuin, siwaz ! da veza gwall dano
An doujañs a zalhed em heñver betek-henn.
Ken doaniuz e kavan ar beh-se da zougen
Ma krog ennon dre fallgalon eur c'hoant divent
Da deurel anezañ 'raog ar houlz war an hent,
Ha da chom da vervel amañ dindan ar gwez,
Pellaet diouz goapadeg an dud, 'vel eun hoh-gouez !

Ollvelen

Nerzveur eo a glevan gand kaoziou ken izel ?
Ar haour a roe deom kalonder ha skoazell,
A zave gand eur ger or strollad dinerzet,
An den kreñv-se bremañ, gand aon 'vefe c'hoarzet
D'ar blanedenn bounner 'zo distaolet warnañ
A deufe, 'vel eur fleurenn gaer e-kreiz an hañv,
Da weñvi, da vervel a-raog e dregont vloa' ?
Ha ni, petra 'larfem o tistrei d'an Donva
D'an neb a houlennfe diganeom : « Peleh 'mañ
An hini 'oa da zond, beo pe varo, amañ ?
Peleh 'ma, kadourien, merer ar hleze noaz ?
Peleh ema, paotrez, manet da zanvez gwaz ? »

Nerzveur

Daoust ha pesort merad 'raio ken d'ar hleze
Ar haour eet digantañ goulou santel an de' ?

Kreñvbost

Greet en-deus bet, mar ne ra ken, tremen e lod :
War an dachenn vrezel, 'vel en eur gwele blod,
En-deus bet astennet mil ha mil korv faro
Da hun etre diouvreh luskelluz ar Maro ;
Ha biskoaz meder ruz, 'doug eur vuhez hir-oad,
Ne roas kemend-all d'eva da waz ar gwad.

Garrwenn

Ya, Nerzveur, diskuiza 'helli hep keuz na mez,
Echu ganit abred eun dispar a zevez ;
'Vidout da veza dall, biken den ne laro
E vo bet kavet par da Nerzveur en or bro.

Nerzveur

Ar haour, marteze c'hoaz, 'hallfe chom en e za.
Med ar pried, penaoz e talho da ruza
Eun tamm buhez renet a-stlej da heul tud all ?
Peseurt harp a roio d'e wreg eur pried dall ?
Aon am-eus e rankfe bale teuh ha dihoant
Gand eur gwaz ken hudur eur wreg yaouank ken koant.
Nann, 'laran deoh, eun den dizremmet evel-henn
N'eo mad da vond nemed da vro Konan Velen⁷⁸.

Ollvelen

Kee 'ta, med e varni 'hanon da vond ivez :
Rag me 'venno diskenn da gousked en e vez
'Tal ar gwaz 'vijen bet oh eureuji gantañ
Laouennoh, eürusoh 'vid gand ar re goantañ ;
E vijen bet lorchuz 'n e gichenn o vale
Ha dreist-oll o sevel diwarnañ bugale,
Rag 'uz d'e zremm dallet eun dremm all a welan,
An dremm muia paduz hag an hini wellañ :
Dremm ar spered uhel hag ar galon leal
O-deus greet din karoud Nerzveur dreist ar re all
D'ar houlz ma tigure daou lagad glaz ha brao.
E garoud am-eus greet, a ran, a rin atao !
(*Hag e lamm da bokad dezañ*).

Nerzveur

Pegen flour d'am skouarn e son da vouezig kêz
O tond, gand kemend-all a deneridigez,
Da zigeri doriou 'gave din 'oant prenet !
Ouz an dall paour eta ne vo ket difennet,
Pa deuer d'o hinnig dezañ a galon vad,

⁷⁸ da vro Konan Velen : ?

Ar pokou-mañ ken fresk ha ken kuñv o zañvad !
Dirag mouez ar Vuhez tavet mouez ar Maro,
Setu 'maon adsavet gand eur gredenn faro
E hellim ober, harp an eil ouz egile,
Dre liorz an Eurvad eur pennadig bale.

Ollvelen

(Krog e dorn Nerzveur).

Te 'vo bremañ va breh, ha me 'vo da lagad ;
Hag e kerzim on-daou gand an hent troad-ouz-troad,
Keit ha ma kendalho rod alaouret an deiz
Da drei deom deveziou bleuniet a garantez.

Pevare arvest

(E ti Nerzveur, evel en arvest kenta).

Kenta pennad

Ollvelen, Garrwenn

(azezet o-diou war skiñvier).

Garwenn

Daoust hag eun dra bennag ganit a hoari fall ?
Ne gavan ken 'hanout seder evel gwechall.

Ollvelen

Eüruz on koulskoude gand Nerzveur, rag biskoaz
Abaoe 'mom eureujet, daou viz a vo warhoaz,
N'em-eus klevet na kroz, na klemm, na dislavar,
Med or gwenvidigez 'm-eus aon 'vefe war var.

Garrwenn

Kaoud a ra dit 'hallfe Nerzveur dond da zroukaad ?

Ollvelen

Ne deuio ket : rag e galon a zo re vad,
Ha va haroud a ra kement hag e garan.
Med pa grenan, Garrwenn, evitañ 'n hini 'ran,
N'eo ket evidon-me.

Garrwenn

Ha diwar-benn petra ?

Eur stumm yhed a zo warnañ deuz ar haerra,
Nemed e benn, goude koll kemend-all a wad,
A deufe marteze dre skuizder da glañvaad.

Ollvelen

Nerzveur a zo ken yah hag an ivinenn vraz
A led 'uz d'an ti-mañ disheol ha skourrou glaz.
Hogen en-dro dezañ en em astenn eun dorn,
'Kreiz an deñvalijenn, kuzet e korn pe gorn,
Hag a glask e dizoud gand sêziou kontammet,
Pe gand mein ne oar den a beleh int talmet.
Burzuduz eo n'ez eus en em gavet evid c'hoaz
Gand ar haour dizifenn na poan, na taol, na gloaz.
Med, o veza gwelet ne deue mên na sêz
D'e gaoud nemed e-eun 'vije lezet er-mêz
Me 'chom atao bremañ d'e ziwall pe vez tost ;
Ha pa'h a diouz ar gêr 'vez renet gand Kreñvbost,
Eet hirio c'hoaz gantañ da bred-meur ar roue.

Garrwenn

Goud a ouie Nerzveur 'oa klask war e vuhe' ?

Ollvelen

D'an taol kenta 'laras : « Eun tenner fall bennag ! »
D'an eil : « Sell eun tenn bir heñvel ouz re Garnag ? »
Ouz an taoliou war-lerh 'n-eus bet greet van ebed
'Med goulenn a-berz piou e hallfe beza bet
Dastumet gwarizi, drougrañs pe gasoni ;
Ha kaer en-doa klask, ne goueze war hini.

Garrwenn

Nann, biskoaz nag e dud, na Nerzveur e-unan
Ne rojont digarez da zrougrañs da ziwan,
Na da gasoni 'bed da hervel muntrez.
Biskoaz n'o-deus greet poan na divaloerez⁷⁹.
Da zen.

Ollvelen

Sell ! petta 'zo ? – Nerzveur o tond d'ar gêr
E-kreiz ar banvez-meur, eñ hag e ambrouger !

⁷⁹ divaloerez : drougiez.

Eil pennad

Ar memez re, Nerzveur, Kreñvbost

Nerzveur

(*Droug ennañ*).

‘Vid c’hoaz n’am-boa ket bet da houzañv kemend-all
A zismegañs abaoe m’emaon ‘n em gavet dall.

Ollvelen

Bet out gand eun bennag disprizet pe goapaet ?

Nerzveur

Dindan treid, ‘vel eun denig netra, ‘maon lakaet,
Eet ‘mêz a gown an taoliou kaer greet gand va dorn,
An Treh ken liez all galvet gand va hadkorn⁸⁰ ;
Da heul va harr-brezel ar spouron o redeg,
Pennfollet gand an trouz kadourien ha kezeg ;
Va nerz-emgann dispar o hounid d’ar Gelted
Chatal, pinvidigez, enor hag eürusted ;
An oll draou-ze n’int ken na delliduz na mad
Abaoe m’on ehanet da zougen daoulagad.

Garrwenn

Daoust petra ‘deus kredet ober dit ken direiz,
Nerzveur ?

Nerzveur

Gwasoh ‘vid skei eur hleze dre va hreiz
A zo greet o tilamm diganin “tamm ar haour“.

Ollvelen

Ha gwir ?

Garrwenn

Ha da biou eo bet roet ?

Nerzveur

Da Dalaour,

Ar hadour yaouank-flamm bet ganin-me desket
War an oll hoariou-brezel, med n’en-deus ket
Prientet d’ar guped an ugentved lodenn
Deuz ar horvou ‘m-eus-me kinniget d’o bouedenn.
Savet ‘zo droug ennon pa’m-eus klevet e vouez
O houlenn, truezuz evel eun naoneg paour,
Ma larje ar roue rei dezañ “tamm ar haour“.
-« Me ‘fell din, emezon-me, ‘vefe peb den gopraet
Hervez talvoudegez al labour en-deus greet ».

⁸⁰ va hadkorn : ger savet evel “kadki“ : Korn ar had.

-« Ar pezh 'zo bet 'zo bet, ha ne zistroio ken,
eme Talaour ; eun dall ne reno birviken
Sêz froñvuz ar maro diwar e garr-emgann.
Te 'zouge betek-henn, Nerzveur, pezh a zougan :
Goaf an taoliou pounner, kleze meur ar gounid,
Med o chom war da skaon eo tehet diganit
Ar gwir d'astenn da zorn war vorzed an tourh-goue'.
Bremañ, ma laran gaou, dislar 'hanon, roue ».

Kreñvbost

O klevoud kement-se, 'm-eus eilgeriet dioustu :
-« Ne gredi ket, roue, mond en hevelb tu
Gand eul leue ken yaouank 'eneb an taro braz ;
Diwall da zisprizoud ar haour a zigoras
D'or meuriad dinerzet hent gwadeg an Donva,
An hini 'n-deus pleget dindanom da veva
Ar pobladou ken gweñv skignet dre Vro-Arvor,
Doñveet gantañ hini hag hini, dalh eñvor
N'eo 'n em gavet zoken dall ar mager brini
'Med dre drubarderez ha diwar gasoni
Sachet gantañ o stourm war an dachenn-vrezel.
Biskoaz den ne roas d'ar vro ken stard skoazell,
Biskoaz da zen n'eo bet ken dleet tamm ar haour ».

Ollvelen

Hag an tamm 'zo, 'velkent, bet roet da Dalaour ?

Nerzveur

Etre 'n heol o sevel hag an heol eet da guz
Dibab ar roue-meur n'eo ket bet dieguz :
-« D'an hini 'zo, 'mezañ, daoulagad en e benn
E roan ar vorzed, gand ma ouio difenn
Ha miroud ouz den all d'e zenna digantañ ».
-« Degouezet eo ganin evid ar wech kentañ ».
'Me Talaour 'n eur lakaad e gleze war an daol,
Hag an neb a garfe degemer eur gwall daol
'N-eus ken nemed astenn e bao beteg amañ ».
-« Me 'zo tremenet din, emezon-me, 'vid bremañ
Naon morzed ha naon all ; med, pa deuio da dro,
Talaour, da 'n em gonta ganin du-hont, er Vro
'Leh ma tigor da vad daoulagad ar re zall,
Ne vo ket evel-henn, m'hen tou dit, da hedall,
P'emaon lakaet amañ disterroh 'vid eul leue
E kimiadan ouzoh, prederourien ha roue ».
Ha kerkent emaom deut, Kreñvbost ha me, d'ar gêr,
'Vite da heul warnom dre zouzder ha dre gaer.

Ollvelen

Mad ho-peus greet ; amañ eh eer da aoza deoh ho koan,
N'ho-po diwar-benn ar pred-meur na keuz na poan.

Kreñvbost

Trugarez deoh ho-taou : p'eo greet va hevridi,
Eo din muioh a-du mond d'ar gêr da bredi.

(Ha kuit).

Garrwenn

Me 'm-eus ezomm ivez da gempenn kalz a draou
A-barz ma vo serr-noz. Eürusted deoh ho-taou.

(Ha kuit ivez).

Trede pennad

Ollvelen, Nerzveur

Ollvelen

Dismegañs 'zo greet dit, Nerzveur ; hogen me 'dou
Ne zebro ket Talaour nemeur a vorzedou.
Ma ne zav den ebed d'e ziskar, me 'zavo,
Nag e ve d'ar vuhez red lared kenavo !

Nerzveur

Ha me n'intentan ket 'vefe risklet buhez
Va brezelourez koant 'vid eur vorzed tourh-gouez.
N'intentan ket ivez beza dleour d'eur wreg,
'Viti da veza dreist ar re all flour ha c'hwek.
Eviti da splannaad dreist an oll briejou,
Da zond da zevel din enor va banveziou,
Amzer a-walh am-bo, 'doug ar beurbadelez,
Da ziskouez, dirag Konan Velen hag e lez,
Pe Talaour pe Nerzveur 'vo bet hag a vo c'hoaz
Ar gwella da vedi tohad ar hleze noaz.

Ollvelen

'Vel ma kiri, Nerzveur : pa gomzi, me 'gerzo ;
Pa vo gwelloh ganit gortoz, me 'hortozo,
D'enor ha va hini, d'eurvad ha va buhez,
Klenket er memez arh gand ar memez alhwez,
Fiziañs deuz o golo, karantez dindane,
Nemed war da lavar ne deufont ahane.
Bremañ eh an da ficha koan : ne vin ket a-bell.
Aze 'vi brao 'kichenn an nor, war da skabell.
Tommdar vad ar Huz-heol o tond d'az saludi.
(Eur pok dezañ p'ema azezet, ha kuit war an tu diabarz).

Pevare pennad

Nerzveur

(E-eun). (Troet war an tu m'eo eet Ollvelen).

Trugarez dit, maouez dispar !

(Troet war an tu diavêz).

Pebez dudi

‘Vije bet evidon arvesti, ‘vel gwechall,
Ouz ar Rod lugernuz pa deu, fêz o ruillal,
Da dizoud doriou ruz an Noz ! Rod entanet ;
Te ‘ro buhez d’an traou, d’an dud ha d’al loened ;
Te ‘rent en koulz d’ar hoad yaouankiz e zeliou
Ha d’ar bed sederraet e wiskamant bleuniou.
Perag n’hall ket ivez da wareg, sêziou da wareg aour
Trehî war an noz du stignet en-dro d’ar haour ?
Da gimiada ganit e sav mil mouez laouen :
Peb lapous war e varr a laosk e ganaouenn ;
An tad-moualh a vez klevet e daol-c’hwitell
Oh eilgeria gand son klemmuz an durzunell ;
Ha gopadenn raouliet ar chas hag ar higi
A lak er pradeier pell du-hont da gregi
Blejadeg gallouduz an tirvi bruchedeg⁸¹.
An evn a hell nijal, al loen douar redeg
Dre ‘leh ma plij gante dindan da sklêrijenn ;
Nerzveur hepken, kelhiet gand an deñvalijenn,
A chom kañvuz e dal e-kreiz ma c’hoarz pep tra,
An noz ennañ, ha te ken flammeg⁸² o lintra !
Va buhez, ken skeduz ha ken brao betek-henn,
‘Zo ‘n em gavet eur beh gwall bounner da zougen,
Ha paneved d’ar wreg oll-garet ‘m-eus aze
‘Vije pell ‘zo treuzet va horv gand va hleze.

(Eur pennadig e chom da brederia, pa glev soniou telenn).

Petra ‘glevan ?... Eun telenner dirag va zi !

Deut em buorz, ema, ‘gav din, o klask treuzi,

Ar hi-stag o tifenn outañ gwas ma hell.

(A vouez kreñv).

Piou ‘lak an diwaller evel-se da harzal ?

(Eur vouez torret a respont a-ziavêz).

Digand ar haour Nerzveur e houlennan digor

Mar deo eñ a welan azezet ‘toull e zor.

Deus tre, n’eus forz piou out ; sach war ar porrastell,

Amañ ‘deus urz⁸³ an oll da zoned er hastell.

(Eun den koz daoubleget, baro hir ha bleo gwenn dezañ, eur goz vantell, eun tamm sah war e chouk, eun delenn vihan en e zorn, a deu gorreg, ‘vel poan dezañ o kerzed, betek an treuziou).

⁸¹ bruchedeg : gand eur pez bruched.

⁸² flammeg : flamm.

⁸³ urz : gwir.

Pempved pennad

Nerzveur, An hini dizanvez⁸⁴

Nerzveur

(En eur zacha e skaoñ e-eun diabarz an ti).

Kee du-hont dirag an oaled da ziskuiza ;
Arabad da hini ‘hanom chom en e za.

An hini dizanvez

(En eur azeza en tu all d’an oaled, e zahig en e gichenn).

‘N em gavet on eta dirag ar haour dispar,
Ken brudet e ano tro-dro war on douar !

Nerzveur

Ar haour, ‘vel ma welez, ‘zo bremañ eet da fall,
Ha n’eus ken dirakout nemed eur paour-kêz dall.

An hini dizanvez

N’eus forz : gweled a ran an daou zorn kreñv-meurbed
O-deus greet ar haerra taoliou ‘zo bet ;
Hag e klevan ar vouez spouroneg ha garo
A ree da verniou tud tehed ‘raog ar maro.

Nerzveur

Da hini-te ‘ziskouez beza mouez eur hoziad.
Eur Helt a zo ‘hanout, pe eun diavêziad ?

An hini dizanvez

‘N em gavet eo tud vraz mibien va bugale,
Ha me torret va horv, skuiz keid-all da vale ;
Deuz meuriad ar Gelted o chom e Nemetos,
En tu-hont d’ar Ster-Veur, emañ deut a-ratoz,
Daoust ma heule⁸⁵ va zud warnon da chom gante,
Daoust m’emaon dre gozni hogoz ken dall ha te,
‘Vid gweled ‘raog mervel ar hadour ramzmentet⁸⁶
A zavas ken uhel brud vad gouenn ar Gelted.

Nerzveur

Te en ‘n hini ‘gleven bremaig o son telenn ?

An hini dizanvez

‘Baoe m’eo dalhet ouzin, daoubleget evel-henn,
Ober va lod labour war an dachenn emgann,
Em-eus desket c’hoari telenn ; hag e vragan
‘Vel eur barz baleer, hed-ha-hed an heñchou.
En eur zon aliez, ‘n gana a-wechou,

⁸⁴ dizanvez : dianav.

⁸⁵ heule : poueze.

⁸⁶ ramzmentet : ken braz hag eur ramz.

Dre va han em-eus bet digand eur pesketaer
Eun tremen berr hag êz war douriou don ar ster ;
Anez, e vije bet red din klask eur gwall dro,
Ha marteze 'raog da weled 'vijen maro.
Trugarekaad a ran eta va zamm telenn
P'he-deus gounezet din ken talvouduz tremen.

Nerzveur

Penaos out bet heñchet da zond beteg amañ ?

An hini dizanvez

Brudet-braz eo al leh m'emaout o chom ennañ ;
Kerkent 'm-eus goulennet digand ar pesketaer,
En-deus diskouezet din gand e zorn ar reter :
« War an tu-ze, 'mezañ, gand heul lez ar Hoad-Meur
En em gavi prestig en Donva, bro Nerzveur ».

Nerzveur

Sebezuz eo m'on anavezet gand an den-ze.

An hini dizanvez

Goud a ouie zoken eo Glazluh da gleze,
Hag az-teus eur wreg koant, Ollvelen heh ano.

Nerzveur

Foeltr biken n'em-bije kredet, war va meno,
'Vije 'r vrud ahanom eet keit-se deuz ar gêr.

An hini dizanvez

Beza meulet ha brudet pell 'zo eun dra gaer,
Nerzveur, d'an hini 'zo nevez krog er vuhe'.
Echuet e zevez gantañ deuz ar beure ;
Ha te, daoust m'eo kollet ganit ar sklêrijenn,
Te 'teus greet eul labour paduz da virviken.

Nerzveur

Pe ano 'reer ouzit, koziad ken helavar ?

An hini dizanvez

Berrdroad.

Nerzveur

Da gomzou mel a daol war va glahar
Distan eul louzou fresk lakaet war eur gouli.
Mar kerez, e chomi fenoz, hag e weli
Ha re veulet eo bet dit va gwreg Ollvelen.

An hini dizanvez

Hag e chomin a-walh, eur zonadeg telenn
A baeo gwella ma hellin an degemer.

C'hwehved pennad

Ar memez re, Ollvelen

Ollvelen

(O tond dre an nor a-zehou).

Eun bennag 'zo ganit, Nerzveur ?

Nerzveur

Eun telenner,

Eur Helt anvet Berrdroad, deuz a-bell deredet

Da weled ahanon ; hag em-eus hen pedet

Da chom fenoz ganeom.

Ollvelen

Bez deut mad en on zi,

Telenner koz, p'out deut en zell da frealzi

Gand da zoniou lirin kalon ar haour gwallet ;

Ra chomo tomm da dreid ouz mên rouz an oaled

Ha digatar da benn diwar or chufere,

Ra vo blod dindanout kongrehen⁸⁷ ar gwele !

An hini dizanvez

Meulet 'oe din, Nerzveur, braventez, kalonder

Da barez ; ne oe ket laret din an hanter

Deuz an oll veuleudi 'zo dleet d'eur vaouez

Ken reiz he stumm, ken eeun he sell, ken dous he mouez.

Biskoaz, 'doug ar vuhez ken hir am-eus renet,

Ne skedas dirakon kemend-all a gened.

'Vid an degemer gouesk⁸⁸ ho-peus greet din ho-taou,

Va lezit da ginnig deoh an tammigou traou

'M-eus degaset amañ.

(Digoret ar zahig, e teu dioutañ eur horn gourejen, kizellet warnañ braoigou aour hag arhant).

Dit, kadour galloudeg,

P'eo pellaet diouzit bremañ ar stourmadeg,

E tle plijoud, me 'gred, eur maout a gorn eva,

Ma helli, pa vo leun dirakout, adveva

Ha lida deread da daoliou kaer gwechall.

(Rei a ra ar horn da Nerzveur).

Ollvelen

O ! na braoad labour !

Nerzveur

(En eur dremen e zaouarn warnañ).

Braz eo : moarvad e hall

⁸⁷ kongrehen : kon (liester koz "ki", ha krehen) : krehen chas.

⁸⁸ gouesk : dudiuz.

Mond ennañ tri gornad deuz muzul ar predou.

An hini dizanvez

Bet eo d'eur gourejen, roue-meur er hoadou
Pa lahis anezañ gand eur spig penn-houarn,
Treuz-didreuz e benn adaleg e skouarn.

Nerzveur

Eur mestr-taol e oa bet an hini 'ziskaras
War an dachenn hemolh eur gourejen ken braz.

An hini dizanvez

Taol a-walh 'oa 'nezañ ; meur a hini sort-se
'M-eus greet bremañ 'zo pell, d'ar houlz ma tegase
Gwad tomm ar yaouankiz galloud d'am izili.
Arabad din ankounac'haad, digarez 'n em veuli,
An hini 'deus teurvezet war he zreuziou nevez
Astenn he dornig gwenn d'ar hoziad dizanvez.
(Tenna a ra deuz ar zah eur hleze bihan, teurniet brao hag arhantet an dornigell anezañ).
(En eur rei anezañ da Ollvelen).
Setu dit, Ollvelen, eur hleze dizano⁸⁹ :
Heti 'ran ma vo treh bepred, ha n'ehano
Ken ma vo da Hlazluh 'n em gavet par pe veh⁹⁰ !

Ollvelen

Par da Hlazluh n'eus bet biskoaz, na vo neb leh ;
Med, tra ma vo miret ouz va dorn da grena,
E valeo "Berrdroad" war roud e vreur hena.
Rag da ano dezañ 'vo lakaet, en eñvor
D'ar hadour a ra din plijadur hag enor
Gand eur hinnig ken talvouduz.
(Hag e skourr ar hleze ouz eur peul en he hichenn).

Nerzveur

Te 'oar beva,
Berrdroad ; med n'heller ket degemer heb eva.
Eur horn hag eur hleze sort m'az-teus deom roet.
N'out ket dindan toenn Nerzveur eun divroet.
Eur gwir vignon a ran ganit, hag eun tañva
A vo red dit ober, 'raog kuitaad an Donva,
Da gement evaj a zalthom, gouest da vezvi,
Gwin a hwez-vad a lak ar pennou da vervi,
Hini gwenn hag a domm, hini ruz balzameg⁹¹ ;
Bier fresk ha c'hwero, dour-mel flour ha taneg⁹².
Pehini 'blijfje dit kemer a-raog da goan ?

⁸⁹ dizano : heb ano.

⁹⁰ veh : pe gweloh evid Glazluh. (beh).

⁹¹ balzameg : balzam, c'hwez vad ennañ.

⁹² taneg : tan e-barz, e-keñver ar blaz.

An hini dizanvez

Eur hornad chufere ne rafe ket a boan.

Ollvelen

Dioustu 'vo degaset, hervez ma houlennit.
An evaj hag eur horn, peogwir te 'zo ganit,
Nerzveur, an hini kaer 'teus bet digand Berrdroad.

Nerzveur

Ya, mall am-eus da houd hag-eñ roio blaz mad.
(Ollvelen a dremen er-mêz, hag a zistro kerkent diou blah war he lerh o tougen eun daol gand daou varh koad, eur podad chufere hag eur horn gourejen).
(Eet an diou blah kuit, Ollvelen a garg ar herniel).

Ollvelen

Evit ho-taou gand levez ha gand yehed !

An hini dizanvez

Eurvad d'an oztizien a dorr din va zehed
Gand an evaj dispar a ro mel ar gwenan ;
Hir vuhez deoh ho-taou !
(Eva a ra).

Nerzveur

Eurvad dit da-unan,
Kadour koz, baleer diskuiz, 'vid ma reni
Eur vuhez didrubuill dindan erh ar gozni !
(Eva a ra ivez).
Eur blaz deuz ar gwella 'zo gand ar horn nevez.

An hini dizanvez

Ar chufere 'zo dreist ; med va zelenn ivez,
Degemeret amañ 'n heveleb tro ganin,
He-deus eur skodenn da baea. Petra ganin
A-gement a rafe deoh ho-taou plijadur ?

Nerzveur

Kan, mar gellez ober, krizder an Tonkadur
Pa beg er hadour kreñv ha yah, 'raog e greisteiz
Da daol warnañ noz diziwez an dallentez.

An hini dizanvez

Kana 'rin an noz du war da benn astennet,
Nemed e c'hoarz ennañ bannou loar ha stered.
(Kana a ra en eur zon gand an delenn war don : "Ar bloaz nevez", gand an aotrou d'Herbais : "Poent eo dit, bloaz koz milliget").

I

Lavar din, peul an emgannou,
Tra la la la la la la la,

Deut an noz war da valvennou,
Tra la la la la la la la,
Ha plega 'rez d'ar Blanedenn,
Tra la la la la la la la,
'Vel d'an avel an halegenn,
Tra la la la la la la la.

II

Lavar din ha te 'zo brevet
Gand ar gozni, gand ar hleñved ?
P'az-teus yaouankiz ha yehed,
Deuz peb gwella 'maout dinehet.

III

Lavar din ha te 'zo difall,
Spered digor, stad dishual ?
Galloud, skiant ha librentez
A ra fae war an dallentez.

IV

Lavar din ha te 'zalh eñvor
Da zeveziou treh hag enor ?
En ez kreiz pa ganint seder,
Noz an dall 'vo leun a sklêrder.

V

Lavar din ha te 'gar soñjal,
An huñvre warnout o nijal ?
P'anvezer ar blijadur-ze,
Ne vez ket a geuz d'ar hleze.

VI

Lavar din, 'kreiz da boan galed,
Ha te 'gar ha te zo karet ?
(Gand muioh a nerz).
Mar chom ganit ar garantez,
Emaout perhenn d'an oll danvez.

Nerzveur

Kanet az-teus ken c'hwek ha ken brao, ma teuan
Ouz da zelaou d'ankounac'haad va gwalleur ha va foan.
Kemer eul lonkadenn dour-mel da ziskuiza.

Ollvelen

(Dezi heh-eun, en eur ziskenn da eva).
Gwasket en-deus iskiz war ar poz diweza,
En eur ober ouzin eur zell daoulagad du
Souezuz.
(A vouez uhel).

Da glevoud, Berrdroad, 'zo eun didu

D'ar skouarn, d'ar spered, d'ar galon war eun dro ;
N'on-eus telenner 'bed ken akuit en or bro.
Beteg an ti-kegin e rankan mond buan
D'ober d'ar "moalezed" dibilla war-dro koan.
Prestig e vin distro.

Nerzveur

Taol pled mad, Ollvelen,
Ma vo roet d'eva d'ar c'hoarier telenn
Deuz peb evaj gwella.

Ollvelen

Roet e vo, Nerzveur.
(Hag Ollvelen kuit).

Seizved pennad

Nerzveur, An hini dizanvez

Nerzveur

C'hoant 'm-eus da zegemer 'hanout evel eur breur,
Berrdroad, en eur ranna ganit madou va zi,
Pa out deut a-ratoz evid va frealzi.

*(E-pad ma komz Nerzveur, an hini Dizanvez a denn a-zindan e vantell eur voestig leun a
boultr melen, hag a skarz anezi e korn Nezveur).*

An hini Dizanvez

(En eur waska⁹³).

Ya, deut on a-ratoz evidout ; ha biskoaz
N'em-eus tañvaet oh en em gaoud dirag eur gwaz
Kemend a blijadur evel dirakout-te.
Evom eta d'or breudeuriez, d'or harantez/

Nerzveur

Evom d'or yhedou, d'on eurvad, d'or buhez !
(Eva a ra Nerzveur).

An hini Dizanvez

(En eur zelled outañ oh eva).

Fazia 'rez, Nerzveur : d'ar maro 'n hini e'.

*(Ollvelen, krak o tistrei, 'ghev an hini Dizanvez, hag a wel Nerzveur o ruillal digomz war al
leurzi, en eur starda e greiz⁹⁴ gand e zaou zorn).*

⁹³ En eur waska : en eur boueza war ar geriou.

⁹⁴ e greiz ; e vruched.

Eizved pennad

Nerzveur (*kouezet*), **An hini Dizanvez**, **Ollvelen**

Ollvelen

A ! trubard, evel-se paez da zegemer ?

(*Lammad a ra bete Nerzveur, hag o veza intentet gand e galon*⁹⁵).

Yen, maro ken kaer, eur haour galloudeg ‘vel hennez !

An hini Dizanvez

Gand e vuhez ‘pae din koll va rouantelez.

Ollvelen

Troet eo da spered ? – Daoust hag eun dra bennag

A vefe bet etre Nerzveur ha te ?...

(*An hini Dizanvez a daol kuit e vantell, e varo hag e vleo, hag a en em ziskourz e stumm ha gwiskamant Karnag*).

Karnag !

Karnag

Laret ‘m-oa dit, p’edod o klask va ludua,

Ne vije ket eno va gwele diweza ;

Rag va fulenn, skoulmet gand eur helt didalve’,

Ne oa gouest ‘med a-boan da zerhel bugale.

‘N-oa greet an tan nemed eun tamm rouza d’am bleo.

A-benn ma oan distag, ha kuit dre lost ar heo

‘Leh ma’z eus eun nor guz ha stouvet gand raden.

A-raog m’en-doa Hildeo peurhreet e dommadenn,

Me ‘oa, goudoret kled a-dreg va gwez dero,

O hoapaad ar re vleup a youhe d’am maro.

C’hoarzet em-eus ivez va gwalh ‘vid an deziou,

Pa zegasen sêziou pe vein da gaoud Nerzveur,

O houzoud e taolfe ‘n tamall war e vreudeur.

Lar bremañ, Ollvelen, p’eo pilet da gadour braz,

Lar pehini ‘hanom eo bet ar gwella gwaz.

(*Ollvelen he-deus diskouret ar hleze roet dezi gand Karnag, hag a zalh anezañ en he dorn*).

Ollvelen

Gwall diskiant eo red ma vefes, ‘benn kredi

‘Zo deut aze ganit eun taol kaer a vedi

Dre m’az-teus kontammet evaj eur hadour dall.

Me ‘raio dit bremaig kana war eun ton all.

Ma’z eus armou ganit, krog enne ; ma n’eus ket,

‘Vo kerhet dit, ha gand eur wreg e vo desket

D’eun treitour Touraniad eur giz laza kempenn.

Karnag

Me n’am-eus ezomm arm ebed da ‘n em zifenn

⁹⁵ o veza intentet gand e galon : o veza dornatet e wazienn.

Ouzit ; ha m'am-bije bet an disterra c'hoant,
'Vijes eet d'ar bed all pell 'zo, paotrezig koant.
Bremañ, deuz va genou lez eur ger da zevel ;
Te 'gemenno goude pe beva pe mervel
'Vo din d'ober. Te 'oar pegement az karan,
Ha penaoz ken liez trubarderez ma ran,
N'eo ken nemed en zell da blijoud d'Ollvelen ;
Te 'wel dre bed karront em-eus ranket tremen,
Dreist ped garz emeon deut evid 'n em gaoud ganit,
Pegen eüruz daou zen a rafem-ni on-daou !

Ollvelen

En eur galon trubard n'hall genel nemed gaou ;
Hag an neb'oar karoud eun den eeun 'vel hemañ
Biken ouz eur gaouiad n'hell dond da 'n em dommañ.

Karnag

(En eur ziskouez Nerzveur).

Treh en e veo, ha treh bepred en e varo !
Koulskoude, m'hen tou dit, n'eo ket eur paotr faro
Gand e zremm dislivet, lagad ebed enni.

Ollvelen

(Kounnaret).

Re bell em-eus lezet 'hanout da hlaourenni.
(Hag e stank he hleze dezañ en e greiz).

Karnag

(En eur goueza, skoet d'ar maro).

Ya, re bell amzer 'm-eus bevet pa ne chom ken
Netra ganin 'med an tu-koll hag an anken ;
Ha, 'vidon da vervel e-kreiz va yaouankiz,
E tridan ouz an dorn a rent din va frankiz,
Ha perhenn an dorn-ze ken gwenn a garan c'hoaz.
(Hag e varv).

Ollvelen

Beva 'ree 'vel eur bleiz ; marvet eo 'vel eur gwaz.
(Dond a ra da zaoulina da gichenn korv Nerzveur).
Dit-te, va haour karet, e tistro va mennoz.
(En eur zelled diabarz e gorn eva).
'Vid ar wech diweza 'fell din beva fenez
Er memez korn ganit, pa zo manet ennañ
Kontamm a-walh d'am has ivez da "Vro an Hañv".
War an heveleb lestr ganit e vennan mond
Da dremen ar Mor Braz, kemer a rin dispont
An evaj a zigoro din dor ar bed all,
Ha ne ranki pennad ebed chom da hedat.
(Pokad a ra dezañ).

Kenavo da 'n em gaoud er Wennva, 'leh ma vo

Rentet dit ar gweled ; e leh ma peurbado
Brud vad da galonder, nerz hag enor da vreh,
Staget eur yeo ganit war benn kornieg an Treh ;
'Leh ma vefom, pellaet kleñved, poan hag anken,
War douar ar frouez aour, eüruz da virviken !
(Eva a ra, hag e kouez maro).